

# AL LANV

AL LANV 31

C'HWEVRER 1985

12 LUR



PESEURT CAPES EVIT AR BREZHONEG? (P.12)

**SPORTOÙ : AR VRETONED WAR AN HENT MAT!**



LIZHIRI AL LENNERIEN

**Kenroad ker.**

Kas a reomp deoc'h hor c'houmanant evit 1985, a-berzh Kristenion Breizh. Kavout a ra deomp ez eus en ho kelaouenn un toullad pennadoù a zo dudus, dreist-holl war da-chenn an darempredoù etrekeltiek. Padal, ne vezomp ket plijet atav gant pennadoù pe vannou-treset zo, dreist-holl, a zo, d'hor soñ, dismegañsus evit an emsaverion gristen e Breizh. Spi hon eus ez aio evelkent ho kelaouenn war wel-lat hag e teuo da vezañ unan eus kelaouennoù pouezusañ an Emsav.

Gant hor gwellañ gourc'hemmennoù hag hor gwellañ hetoù evit ar bloavezh nevez.

a-berzh Kristenion Breizh ar sekretour : Tepot Gwilhmod

**Tudou,**

Ne goumanantin ket d'Al Lanv. Perag ? Aeset da respond: abalamour me soñj din "Unvaniezh a ra nerzh". Da lavarout eo red eo deoc'h en em gevout gant skipailh ar gazetennig "Bremañ" evit sevel ur gazetenn vrezhoneg modern (stil "Time" pe un dra sort-se) kap da zastum ar muññ posubl a lennerien vreizhat. A hend all e chomjec'h barzh ur ghetto. A galon hag atao prest d'harpañ ac'hanoc'h evit tizhout trezek ar raktres meur se.

Dr. Le Mee Lannuon

Setu, a gav deomp, abegoù didalvoud a-walc'h evit chom hep koumanantiñ. Sevel ra "Bremañ" hag "Al Lanv" labourioù dishenvel met ken talvoudus all. Evit ar pezh a sell ouzht ar ghetto... Ha ma kaste deomp an Dr. Le Mee penna-doù ? Setu aze un doare da "zi-ghettoñ" "Al Lanv". Trugarez dezhañ en a-raok.

Al Lanv

Div stal : 2 straed ar Roue Gralon 29000 KEMPER (98) 95.42.82  
Plasenn g'Werin 29200 BREST (98) 44.05.38



LEVRIOÙ BREZHONEK HA BREIZHEK  
PLADENNOÙ EUS BREIZH HA Keltia TRAMOR  
PEZHOÙ ARTIZANELEZH

**BREMAN**

BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN

KAZETENN AR STOURMOU E BREIZH. BEP  
DAOU VIZ E TEU ER-MAEZ KELEIER AES  
HA BEV DIWAR-BENN BUHEZ AR VRO.  
KOUMANANT : 50 LUR. 8 STRAED HOEHE  
35 000 ROAZHON. (SKOL AN EMSAV)



(96) 35.80.64

Ostaleri - Abadennoù

KONFORT-BERC'HEDE (Bro-Dreger)

**STAJOU BREZHONEK**

- Pask -

01-06 Ebrel Staj brezhoneg evit liseidi kenaozet gant "Unvaniezh ar Gelmmerien"  
09-11 Ebrel Staj stummañ monitourien kampoù-hañv bugale.  
10-12 Ebrel Devezhoù-studi war al lennegezh vrezhonek a-vremañ.  
13-14 Ebrel Dibenn-sizhun marc'hegañ

- Etre Pask hag ar Vakañsoù Bras -

20-21 Ebrel Dibenn-sizhun brezhoneg kenaozet gant S.A.E. (pep live)  
27-28 Ebrel Dibenn-sizhun Natur an Aberioù.  
04-05 Mae Dibenn-sizhun peurzestkif brezhoneg.  
08-09 Even Dibenn-sizhun brezhoneg kenaozet gant S.A.E. (pep live)  
15-16 Even Dibenn-sizhun bageal / Dibenn-sizhun c'hoariva kenaozet gant Ar Vro Bagan.

(An holl stajoù zo dalc'het e brezhoneg penn-da-benn nemet ar re merket gant ur steredennig (\*).)

Prizioù 1985  
Kartenn-zeel : 50 L., Pred : 30 L., Nozvezh : 30 L., Devezh-staj (gant ar c'hentelioù) : tro 110 lur, Dibenn-sizhun (gant ar c'hentelioù) : tro 120 L.

Oadl Diwan Treglou 29214 Lannilis pg (98) 04.07.04.

**TAOLENN**

AL LANV Niv. 31

Lizhiri al Lennerien ..... 2  
Pennad-Stur ..... 3

**KELEIER ETREROADEL**

KEMBRE Harz-labour ar c'hlaouerien *John Idris* ..... 4  
AZIA Afghanistan *Padrig an Habask* ..... 5  
AMERIKA Trosell war broioù Amerika ar Su  
*Padrig an Habask* ..... 6  
AZIA Tud an Himalaya *T.B.* ..... 9

**BREIZH**

YEZH Stourm ar C'h.A.P.E.S. *Per Denez* ..... 12  
TREGER Tregem Tregem *Divy Kervella* ..... 12

YEC'HEDE Buhez ar boestoù-mir a ya da get *Agnes Simon* ..... 13  
BANNOU-TRESET Psi-kozh-noe *Tudu* ..... 15  
SKINWEL j'Fañchig Superstar! *L. Ejen* ..... 18  
YEZHOU Ur yezh evit an urzhiataerezh *Tim Ogouboul* ..... 18  
SKINWEL Diviz *Tudu* ..... 19  
ISTOR Istot Breizh *J.L. Dey* ..... 20  
N'eus forzh petra *Leonid Rosko-Pouding* ..... 21  
PREDER Kristeniezh *D. Carré* ..... 22  
SONEREZH John Forgyet *Gurvan* ..... 23  
Burutell-me-what-you-are... *Gurvan* ..... 24  
BERR-HA-BERR *Daniel an Doujet* ..... 24  
EMBANN Jakez Karter *Paskal ar Marc'heg* ..... 25  
LEVRIOU *Glen Livet* ..... 26  
LENNEGEZH Liam O'Flaherty *Leonid Rosko-Pouding* ..... 29  
KANV Marsel Klerg *Per Denez* ..... 31  
BANNOU-TRESET Beaj Toñtoñ e kêr Roazon *Tadevab* ..... 32



**AL LANV**

CPPAP 62602  
ISSN 0246-5396

Kelaouenn diskleriet hervez lezenn  
Rener : **Padrig an Habask**  
Ti-moulañ : **du Marin**, ar Gelveg

Al Lanv  
8 straed Enez-Vaz  
29000 KEMPER

C'hwervrer 1985

Koumanantoù :  
ordinal ..... 70,00 lur  
skoazell ..... adalek 100,00 lur

**PENNAD-STUR**

Kendec'hel a reer d'ober goap ac'hanomp. Miterrand en e brezegenn e Roazon a sav a-du gant ur C'h.A.P.E.S. kemmesk brezhoneg/lizhiri modern. Pebezh kavadenñ sebezus, anat deoc'h eo re zister hor yezh da gaut ur C'h.A.P.E.S. diouti hec'hunan ! N'eus nemet ar F.E.N. a vefe laouen gant kinnig ar P.S. ha c'hoazh e kinnig e c'hellef bezañ koublet ar brezhoneg gant danvezioù all. Respont an Emsav Sevenadurel a zo bet sklaer "NANN" daoust pegen dister eo bet ar plas roet dezhañ er c'helaouennoù bras. Ne vo ket trawalc'h embann

**KENSKRIVEREZH E BREZHONEG**

Ar studierien war ar brezhoneg a garfe eskemm lizhieroù gant ken-vroidi amparz war hor yezh, evit en em vrekkaat, n'o deus nemet skrivañ da "Skingonz ha Skinwel" o lavarout o dad ha pere eo an danvezioù a blij dezho ar muññ.  
Lakaat un timbr evit ar respont.

**UN AROUEZ EVIT AR VREZHONEGERIEN**

Beajiñ a reer kalz hiziv an deiz ha kejañ a reomp alies gant brezhonegerien dianav. Me hag a skriv kement-mañ, en deiz all, en trefn en ur vort da Bariz, em sus bejaet gant ur paotr yaouank o tont evelдон eus bro Dreger ha d'am goulinn hag-eñ e ouien brezhoneg am boa gwelet diouzhtu e vije eürus-tre oc'h ober kaoz ganin betek Pariz.

Ret e vefe d'ar vrezhonegerien, d'am soñj, dougen un arouezig bennak evit reññ da c'houzout ez int brezhonegerien. Ne gav ket deoc'h ?

"Skingonz ha Skinwel" 9b str. St-Vincent-de-Paul 22000 S. BRIEG.

*Skoazellit  
Diwan!*



er c'helaouennou e ranker kaout ur C'h.A.P.E.S. brezhoneg penn-da-benn, ret e vo huchal asambles hon dizemglez gant ar Barizianed a wash war hor sevenadur eus Paris pe dostoc'h deomp.

Kalonেকaus eo bet gwelout krouidigezh ur gevredigezh nevez da gas hor yezh war-raok, hini ar vaered hag an dud dilennet. Salvi ma kaso an unvaniezh nevez-se al labour war-raok ha ma vo gwel-let heuliadoù fetis d'o c'homzoù a-raok pell ! Muioc'h eget biskoazh ez eus ezhommer kemer divizoù start da saveteñ hon yezh, muioc'h eget biskoazh e vez santet e ranker skeñ asambles etrezek ar memes pal hag evit ar wech kentañ abaoe pell e vez santet ul lusk a unvaniezh en Emsav sevenadurel !

# kembre

## HARZ-LABOUR AR C'HIAOUERIEH

Abaoe miz Meurzh warlene ez eus bet muioc'h eget daou diwar dri eus mengleuzerien glau Breizh-Veur diskrog diouzh o labour. Disheñvel diouzh ar re voas e Breizh-Veur eo an diskrog-mañ. N'eo ket un harz da gaout muioc'h a arc'hant — kentoc'h un harz da zerc'hel ar mengleuzioù glau digor. Un harz-labour politikel bet rakwelet spis-tre gant gouarnamant Thatcher da zispenn Unvaniezh ar C'hlaouerien\*, da lavarout eo unan eus an unvaniezhioù kreffañ e Breizh-Veur a-benn kaout o digoll war ar c'hlaouerien evit darvoudoù 1974 pa voe diskaret gouarnamant mirour Edward Heath gant Unvaniezh ar C'hlaouerien.

Da zisrannañ ar c'hlaouerien war-lerc'h o zerc'h e 1974 e voe ijinet un doare nevez gant renerien ar mengleuzioù glau, da lavarout eo *Bodad ar Glau* (National Coal Board); goprañ muioc'h ar vicherourien a labour er mengleuzioù a genderc'h kalz a c'hlaou. Kement-se a dalvez e c'hounez glouerien Sir Nottingham ha Derby e-kreiz Bro-Saoz kalz muioc'h eget an darn vrasañ eus glouerien kreisteiz Kembre, 'lec'h m'eo diaes-tre dre abegoù a zouarouriezh kleuziañ evit kaout glau. Bodad ar Glau en deus postet ivez milionoù a lurioù saoz e tachennoù mengleuzioù glau nevez, reoù evel Selby e Sir Efrog (Yorkshire) gant krennañ ar postadurioù e tachennoù mengleuzioù Kreisteiz Kembre. Abegoù a zouarouriezh, hervez Bodad ar Glau, a zo bet kaoz da gemetez ivez. Kalz a-seoc'h eo tennañ glau eus mengleuzioù digor eget eus mengleuzioù diindan an douar.

Anvet eo bet Ian MacGregor da rener Bodad ar Glau gant Thatcher hag urzh dezhañ da efedusaat ar mengleuzioù glau (e Breizh-Veur eo perc'henn ar gouarnamant war ar mengleuzioù glau abaoe o broadeladur e 1948 ha renet int



Al Lanu

gant Bodad ar Glau. Mevel ar gouarnamant eo ar bodad-se. Rannet eo Breizh-Veur e toledoù kenderc'hañ : Bro-Skos, Biz Bro-Saoz, Efrog (Yorkshire), Hanternoz Derby, Nottingham, kreiz Bro-Saoz, ar c'hornôg (gant Lancashire hag hanternoz Kembre), Kent ha Kreisteiz Kembre. Dileurid o deus ar c'hlaouerien e pep toled an unvaniezhioù lec'hel. Pep unvaniezh lec'hel a zo ezel eus Unvaniezh Vroadel ar C'hlaouerien a zo un sindikad kevredadel eta).

Penn Unvaniezh Vroadel ar C'hlaouerien eo Arthur Scargill, ur c'homunour eus Sir Efrog. Da heul diviz MacGregor da serriñ pemp mengleuz e miz Meurzh e c'halvas Scargill ha Kuzul labour ar sindikad d'un harz-labour hollek. Scargill a lavare e oa Bodad ar Glau o vont da serriñ 20 mengleuz en holl ha da zifredañ 20.000 glauer. Ret eo derc'hel soñj eo ar glau an andon labour nemet e kalz a doledoù hag ez eus ouzhpenn 3 milion eus poblañs Breizh-Veur dilabour dija (war-dro 13 dre-gant eus ar poblañs). Ret derc'hel soñj ivez eo tuet Bodad ar Glau da serriñ mengleuzioù. E 1979 pa zeuas gouarnamant Thatcher d'ar galloud e oa 235.000 a c'hlaouerien o labourat e 223 mengleuz. Pelloc'h e 1984 e oa 182.000 o labourat e 175 a mengleuzioù.

E kreizig-kreiz an harz-labour emañ termenadur ar ger "mengleuzioù diarmerzhel". Hervez Scargill e talvezfe mengleuzioù n'eus mui tamm glau arno hag evit MacGregor mengleuzioù ne reont ket trawalc'h a c'hound ha n'int ket evit termen hep valec'hadoù ar gouarnamant.

Diouzh o istor hag o c'hudennoù douarouriezh eo bet respont an toledoù glau. Glouerien Nottingham, Derby ha kreiz Bro-Saoz a nac'has diskregiñ diouzh o labour pa ne oa ket o mengleuzioù en arvar da vezañ serret. Holl c'hlaouerien an toledoù arall a ziskrogas da gentañ, hogen bremañ war-lerc'h nav miz eo krog an darn vrasañ eus an toledoù-se da wanaat. E miz Du e oa 180.000 glauer diskrog ha ne oa den war e labour e Sir Efrog nag e Kreisteiz Kembre, un nebeud en toledoù all war-bouez Derby ha Nottingham. E penn-kentañ 1985 e oa 35 % eus glouerien Breizh-Veur war o labour. 2.700 diwar 12.000 a oa distroet d'o labour e Bro-Skos, 3.000 diwar 50.000 distroet e Sir Efrog ha 150 hepken diwar 22.000 distroet e kreisteiz Kembre.

Pelloc'h n'eus tamm spi ez echufe an diskrog-labour hag emañ ar gouarnamant o klask naonañ ar vicherourien d'o lakaat da zistreiñ da labourat. Kalz a vec'h a zo bet etre ar



bikedourien hag ar bolis — tud gloazet bras a bep tu hag unañ lazhet. Diskouezet splann en deus MacGregor ne oa ket prest da varc'hata daoust da rannoù iliz ha da unvaniezhioù labour all bezañ embannet o harp d'ar c'hlaouerien. Kalz a vlenierien tren a nac'h dezougen glau — mes paet e vez ker-ruz blenierien kirri-samm gant Bodad ar Glau (tud war o c'hont int) da dreuziñ linenoù ar pikedoù harz-labour gant o c'hirri-samm. Gwir eo ivez e talc'h Unvaniezhioù a bouez, evel an dredanourien, da gas glau d'ar c'hreizennoù. Spi Scargill eo e vefe koust an harz-labour gant ar c'hout da zerc'hel miliadoù a boliserien da ziwall ar mengleuzioù diouzh ar bikedourien hag ar c'hout ouz-henn da zeviñ eou-maen e-lec'h glau er c'hreizennoù tredan, an tu-hont da c'halloud ar gouarnamant. N'eus forzh penaos he deus divizet Thatcher distrujiñ Unvaniezh ar C'hlaouerien ne vern pegen uhel e vefe ar c'hout.

## AN HARZ-LABOUR E KEMBRE

A-raok an harz-labour e oa 2 vengleuz glau o vont e biz Kembre hag 28 mengleuz gant 20.000 micherour e kreisteiz Kembre. A-gezh eo bet kalz stourmusoc'h glouerien ar c'hreisteiz eget reoù an hanternoz. Setu ar pezh a zo bet gwelet ar wech-mañ c'hoazh. A-benn diwez miz Kerzu, daoust dezho bezañ diskroget evel ar re all er penn-kentañ — e oa distroet ar muiañ niver anezho d'o labour daoust d'o dazont bezañ en arvar !

Er c'hreisteiz ne voe ket memes kont — n'eus nemet 150 micherour o labourat ha ne ya en-dro ar c'henderc'hañ glau e hini ebet eus ar mengleuzioù. Kement-se a zegas war wel amzer dremenet ar greantelezh er c'hreisteiz. Kalz a vengleuzioù zo bet serret — da skouer : mengleuz ar Maerdy a zo an hini nemetiñ a chom digor e stankenn ar Rhondda — mare zo bet e oa 50 mengleuz o kenderc'hañ glau eno. Kalz war zigresk eo aet niver an dud a zo o chom

hag o labourat e stankennoù glauou kreisteiz Kembre e-pad ar 25 bloaz diwezhañ-mañ. Poent zo bet, sur a-walc'h, e oa tost d'ur milion a dud o chom e Kembre a veve diouzh ar glau. Pelloc'h eo ur 100.000 bannak a dud a vev hepken diouzh ar glau war-eeun pe da heul.

Ma vez serret muioc'h a vengleuzioù er c'hreisteiz e talvez kement-se e vo serret ivez labouradegoù mekanikerezh ha reoù dezougen glau. Krennet e vo war c'hreanterezh an douar, an aezhenn hag an energiezh lec'hel. Da heul e vefe nebeutoc'h a arc'hant evit ar servijoù sokial, sur a-walc'h e vefe krennet ivez war ar c'hementad arc'hant roet d'ar skolioù ha d'an ospitalioù. Kement-se-holl en ur vro m'emañ feur ar c'hlevedoù kalon an hini uhelañ eus Breizh-Veur, ma ra o reuz ar c'hudennoù alkooleg ha m'eo an disterañ an liz hag an aezamantoù !

Dirak gourdrozioù a seurt-se eo nemet start ar c'hlaouerien a-enep MacGregor ha Thatcher. Bodadoù da harpañ ar c'hlaouerien a zo diwanet e pevar c'horn ar vro. Ar gelennerien hag ar gouerien unanet da harpañ ar c'hlaouerien. Kaset e vez pakadoù boued eus broioù Europa evel eus toledoù gounezel Kembre d'an toledoù glauouk. Ar stourm-mañ en deus unanet ar gembraerigen hag ar Gembreiz all. Ar Strollad Labour ha Plaid Cymru en o eneberezh ouzh divizoù MacGregor. Gwellet e vo hag-eñ e raint berzh a-enep ar "vaouez-houarn" hag he faotr glau. — MacGregor — *an elderly American gentleman* — hervez ur gelaouenn (e penn un embregeroñ dir en Amerika e oa a-raok dont da Vreizh-Veur evel rener Kevredad an Dir Predenek (British Steel Corporation) ha skarzhañ implijoù er greanterezhe ivez). A-dras-ur eo a-du start tud kreisteiz Kembre gant an harz-labour, gwellet e vo hag-eñ e vo nemet ket start glouerien all Breizh-Veur da zerc'hel bevo e c'humuniezhioù.

John Idris

\* Glouerien a implijan arnañ evit paotred ar glau, micherourien ar mengleuzioù glau.

\*\* Ur jentleman amerikan deut war an oad.

# azia

## AFGHANISTAN

Ur vro disrannet-tre eo bremañ ha diaes deomp kompren ar pezh a c'hoarvezet enni. Rannet etre meur a veuriad hag a yezh ez eo ar vro-mañ leuren un emgann didreuz etre an U.R.S.S. hag an Islam.

Babrak Karmal, pennsekretour ar Strollad Poblek Demokratel Afghan, hag e strollad a zo dic'houest a-grenn da c'houarn ar vro hep galloud ar Soviedourien. Gwastet eo an armerzh gant ar brezel, ne ya ket endro ar skollata hag al

labouradegoù... Disrann a zo, zoken, er strollad-ren etre div lodenn, ar c'h'Khala (ar bolis) hag ar Parcham (ar banniel). Ken e c'hoarvez lathadegoù alies a-walc'h etre an div lodenn enebet-se en arme afghan.

Cheñchamantoù don a zo c'hoarvezet er pobladur abaoe aloubidigezh ar Rusianed. Pevar milion a dud diwar tri-vech milion a Afghanizo a zo tec'het kuit d'an estrenvro (Pachoune dreist-holl war-zu ar Pakistan) hag er vro ez eus deut ur bern tud diwar ar maez da chom er c'h'heriad da dec'hout diouzh an tachennoù emgann, diouzh ar bombezadegoù hag ar spont. Eus 800.000 a dud er g'berenn pevar bloaz 'zo eur tremenet da dost da 2 vilion hiziv...

Poupiqou, c'hoarlioù eo tud ar gouarnamant etre daouarn ar Rusianed. Ar re-mañ, mistri wirion ur vro, a bouez war veur a dachenn da soviedekaat Bro-Afghanistan.

War ar relijion; klask a reont prenañ mollahed ofisiel.

(da vezañ kendalc'het p. 8)



# amerika

## TROSELL WAR BROIOU AMERIKA AR SU

Kalz a vroioù eus Amerika ar Su hag a oa dindan gzel-yeve diktatouriezhioù jeneraled a zo o tont en-dro d'an demokratelezh. Koulskoude, zoken er broioù-se, emañ c'hoazh en arvar ar gwirioù demokratel esunañ : gwir da votiñ, gwir d'an unvaniezhioù micherourien, frankiz ar gomz h.a. E tost-da-vat an holl vroioù-se e kaver un dregantad a c'hwazh eus ar monez ha d'leoù spontus d'al Leveoù Moneiz Etrevoudel (F.M.I.) pezh a vir outo da gaout un armerzh yac'h. Dindan dalc'h an trafikerezh arc'hant etrevoadel eo start d'ar bobl sevel he fenn !

### AN ECUADOR

D'an 20 a viz Ebrel 1979 e voe pilet en dilennadegoù kannad an trikon-reen soudardel, 70 % eus ar mouezhioù a yeas war anv Jaime Roldos, sokial-demokratour hag Orwald Hurtado (demokratour-kristen). E vit ar wech kentañ e vote 500.000 den dilezek ! Bremañ eo Leon Febres Cordero a zo e penn ar vro, ur mirour anezhañ. Ar galloud a zo etre daouarn un tu dehou start-tre mes trech eo an tu kiziz er parlamant. E vit ar wech kentañ abaoe 28 vloaz eo tremenet ar galloud en un doare demokratel eus ur prezidant d'unan all...

### BRAZIL

Ret eo bet d'ar jeneral Joao Baptista Figueireda laoskaat un disterañ ar c'hrog start dalc'het war ar vro abaoe ugent vloaz. A-enep dilennadeg ar prezidant war-eeun gant ar voterien e oa ar jeneral. Milionoù a dud a zibunas er straedoù evit an "directa ja". Daoust d'ar mouezhiañ bezañ dieeun danvez-kannad an Emglev Demokratel a zo bet trech d'ar 15 a viz Genver 1985, lod eus dileuridi kostez ar galloud o deus mouezhiet evit Tancredo Neves, ar prezidant nevez. Hemañ a oa penn ministr ar gouarnamant reizh diskaret gant ar putsch e 1964.


### URUGUAY

Ur bodad jeneraled a oa e penn abaoe taol 1973, dre guzh, ha war-eeun abaoe 1976. Ken start eo bet ar stourmadoù sokial warlene m'o deus ranket ar jeneraled kendivizout gant o eneberien da varc'hata war o dilez galloud. Un emglev zo bet sinet da gaout votadegoù d'ar 25 a viz Du ha da staliañ ur gouarnamant reizh d'ar 1añ a viz Meurzh 1985. N'eo ket bet demokratel ar votadegoù-mañ avat, kantadoù a brizonidi bolitikel a oa c'hoazh en toull-bac'h, berzet eo bet ouzh daou zen brudetañ ar vro, Wilson Ferreira Aldunate (rener ar Strollad Broadel en toull) ha Liber Seregni ar jeneral stourmer e penn an Talbenn Ledan (Frente Amplio) d'en em ginnig.

Klask a ra ar jeneraled kuitaat ar galloud en ur chom e penn memes tra. Heñvel gont e Bro-Chile hag e Paraguay.

### HONDURAS

Votet ez eus bet eno da zillenn ar prezidant d'ar 27 a viz Genver 1982, ur frankizour, Roberto Suazo Cordoba, a zo bet lakaet e penn ar vro. Arabat krediñ ez eus bet an disterañ cheñchamant avat, chomet eo ar galloud etre daouarn an arme evel abaoe 18 vloaz, ar jeneral Gustavo Alvarez Martinez eo an den kreñv. Harpañ a ra ar Stadoù Unanet en o brezel kuzh a-enep Sandinourien Nicaragua ha stourmerien ar Salvador hag ar Guatemala. Betek re e reas ar jeneral-mañ, lakaat muntrañ eneberien, skrapañ tud, beredoù kuzh, breinañ an dud... Ken e voe kaset kuit d'an 31 a viz Meurzh 1984 ha lakaet en e blas ar... jeneral



### GUATEMALA

Mouezhiadeg evit dilenn kannaded ar vodadeg-kenreizhañ d'ar 1añ a viz Gouere 1984. Ne oa nemet strolladoù an tu dehou war ar renk. Dre heg e rankas an holl dud mont da votiñ... 26,45 dre gant anezho a vouezhias gwenn pe dalvoud !

### NICARAGUA

Gant ar votadegoù a zo bet ar miz tremenet ez eus bet savet bec'h un tammig a bep tu er bodad enklask amerikan ket demokratel h.a. Hiziv e sav ur bodad enklask amerikan liestuek e vouezh da lavaret e oant deraet hag e oa bet graet ur striv da chom hep pouezañ war ar vouezhierien ha da reiñ ar gaos d'an holl... Seizh strollad diwar an unnek a zo er vro a oa war ar renk, ar pevar all daoust da zivizoù stank gant ar galloud sandinour o doa kavet gwelloc'h d'erc'hel da c'houlenn groñs dieubidigezh ar somzourien hag ar "c'hontras" toullbac'het. Ar re zivezhañ-mañ a zo kiriek eus marv 9.000 den a Nicaraguaniz hag a 300 milion dollar a zistriv er vro. E doare pe zoare e oa an dispac'herien sandinour da vezañ taget gant an Amerikaned, ma vijent chomet hep aozañ an dilennadegoù prometet ha zoken en ur aozañ anezho. Da heul ar votadeg-mañ e laosko o flas ar C'huzul-Stad hag ar Bodad-Ren sandinour d'ur vodadeg, d'ur prezidant ha d'un isprezidant, dilennet holl.


E peseurt stad emañ an traoù er vrose ma ra c'hoazh ar brezel e reuz enni. Setu pere eo an daou erv pennañ bet boulc'het gant ar gouarnamant : adaozañ an douaroù ha diazezañ un armerzh kemmesk. En armerzh kemmesk e kaver ur rann stadel a bouez hag ur rann brevez a bouez ivez. Divizet ez eus bet goude hir daelañ choazañ ar c'hens-talioù da ziazezh armerzhel al labour-douar. N'eo ket atarroù Stad a vo ar skouer amañ eta mes atantou renet gant ar gouerien o-unan. Grevus e chom an traoù gant an dileoù diavaez o pouezañ hag an tailhañ marc'hadouerezh en abeg d'ar brezel. Nac'hañ a ra ar Stadoù-Unanet hag ar bankoù etrevoadel d'o heul prestañ arc'hant d'un dispac'herien abaoe 1983 daoust da alii a-du an ispalisourien... Mougañ ma n'eo ket tagañ !

Demokratel ha liesseurt eo chomet Nicaragua pelloc'h, armerzh kemmesk, kenstaloù labour-douar, sindikadoù liesseurt ivez ha war-un-dro markouriezh ha kristeniezh da genlodennerien an dispac'h sandinour. Ne blij ket kaer d'ar Vatik an doueoneiezh dieubiñ ! Diouzh tonkad ar brezel e vo hini an demokratelezh ivez, klasket e vo heuliañ a-dost amañ an dispac'h sandinour.

### ARCHANTINA

Pal gouarnamant demokratel Raoul Alfonsin adal an 10 a viz Kerzu 1983 a zo bet kastizañ gwallerien gwirioù mab-den, diskar an trafikerezh arc'hant hag adsevel un armerzh warnañ gourbouez un die diavaez a 45 milion a zollaroù. Ar mell fazi kentañ a zo bet graet eo bezañ lakaet lez-varn an arme hec'h-unan da varn ar vouerevien. A-hend-all

Quito, kêrbenn an Ecuador.



e voe roet da garg d'ur bodad enklask sevel ur rentañ-kont war ar gwaskerezh tremenet. D'an 20 a viz Gwengolo 1984 e tisklerie ar skrivagner Ernesto Sabato, rener ar bodad-se : "Diwar an dafaroù niverus-spontus a zo bet dastumet ganeomp e c'heller embann eo bet gwallet gwirioù mab-den en un doare aozet ha steuñvekaet a-berzh Stad, dre waskerezh an armeoù". Ur pennadig goude ez embanne lez-varn an arme ne oa ket evit kastizañ ar soudarded tamallet dre ma n'o doa ket "pledet" gant tud "doujus ouzh al lezenn". Nebeut a soezh o welout an arme o wareziñ he zorfedourien ! 340 kamp-bac'h dre ar vro, 8.691 den skrapet dirak testoù ha lakaet da dud "kollet" hiziv an deiz ! Bez' en deus ranket ar gouarnamant kilañ ivez war dachenn e zleoù. E soñj e oa bet kas d'e heul broioù all Amerika ar Su en e nac'hadeg da baeañ e zleoù pe lod anezho da nebeutañ d'al Leveoù Etrevoudel. Petra a c'houlenn al Leveoù Etrevoudel ? Yac'haat an armerzh, louzaouiñ anezhañ a-zoare, troc'hañ diouzh ar c'hef ar skourroù fall ma vez ret... Reolennoù start war an armerzh ha war ar vicherourien evel just. N'eo ket gwall brest ar bobl avat da sentiñ ouzh reolennoù tailhus strizh pa wel ar gvalourien o trafikañ, gwashoc'h eget biskozh, gant o arc'hant. Da ziwall 'zo ivez ne zeufe endro e penn renerien an iliz Katolik, ar re gil-stourmerañ ha mirourañ eus an holl vroioù-se...

Hiziv emañ an demokratelezh nevez en arvar gant ar gour-drouzoù war gwirioù mab-den ha start e vo da renet ar Stad, Raoul Alfonsin, d'erc'hel mat ar stur betek mouezhiadegoù ar gannaded ar bloaz-mañ.



**BOLIVIA**

Kuitaet he deus an arme ar galloud e 1981. Abaoe avat n'eo ket bet stabilaet ar gouarnamant, tri zaoi-Stad c'hwitet a-enep ar prezidant Hernan Siles Zuazo, nouspet cheñchamant er c'hempouez gouarnamantel...

Disfiziout a ra ar bobl diouzh ar strolladoù politikel a zo o ren... Ar mestr bras a chom ar C'h.O.B. (Sindikad ar Vicheourien Voliviat). Int eo o doa sonet glazoù ren an arme gant diskrog-labour ar vengleuzerien adal miz Du 1981. Gouest eo ar sindikad-mañ da lakaat micherourien ar vro a-bezh e diskrog-labour evel pa oa bet skrapet ar Prezidant pe nebeut goude evit lakaat ar gouarnamant da gemer divizoù armerzhel ne vefent ket war-goust al labourerien. Plegañ en doa graet ar gouarnamant.

Gwall glañv eo armerzh Bolivia ! C'hwetz moneiz a

2.500 dre gant ar bloaz dre vras, koll talvoudegezh spontus eus ar moneiz... Stourmet he deus ar C'h.O.B. evit ma ne vefe ket paet an die a 4 miliard a zollaroù d'al Leveoù Etrevroadel. Pelloc'h ne vez paet netra. E miz Mae 1983 e talveze ur gopr etre a 12.000 peso boliviat 600 dollar, e miz Gouere 1984 ne dalvez ken nemet 100 dollar. Pinvidigezh ar vro, ar staen, n'en deus ket mui kement a bouez ; war marc'hadoù ar bed eo digresket ivez ar c'hementad tennet e Bolivia dre ziozer a bostadurioù...

Demokratiezh ar galloud, pobl disfiziuz, soudarded 'zo mil brest da lakaat an urzh da ren en-dro, setu un diaes a vicher evit ar rener istorel a zo eus Hernan Siles Zuazo.

*Padrig an Habask*



lakaat a reont abadennoù islamek war ar radio, kinnig pirc'hirinadegoù evit netra d'ar Mekka pe c'hoazh da Vro-U.R.S.S. da vont da welet pegen yac'h eo an islam eno.


War ar broadoù, disrannañ a fell d'ar Sovietourien. Harpañ a reont meuriadoù 'zo a-enep re all, stummañ kargidi "missionerien" nevez, diorren vezhoù bro evit deskñ d'an dud o istor adstummet penn-da-benn... Padal ez eo bet lakaat ar rusianeg da zanvez studi ret e skol-veur Kaboul. Disrannañ ar meuriadoù etrezo evit disrannañ ar vro hag ar stourm eheñfi...

War ar Batchouned, anezho ar meuriad brasañ, diazez ar Stad afghan abaoe an XVIIIvet kantved (Afghan a zo kenter gant Patchoun). 90 dre gant eus ar repuidi a zo Patchouned. Pal ar gouarnamant eo gwanaat ar Batchouned.

War an harzerezh e-unan en ur blantañ spierien en o mesk, en ur dreññ pennoù brezel eus an harzerezh a-enep o c'henstourmerien h.a. Kadoniez Andropov a oa implijout spierien da intrañ ha da zisrannañ an harzerezh. Hini Tcherenkenko a zo bombezañ, bombezañ, spontañ poblañsoù a-bezh d'o lakaat da blegañ.


An harzerezh eo diaes dezhañ talañ ouzh un nerzh ken spontus harpet gant gwikefre brezel an U.R.S.S. Dont a ra armoù an harzerien eus ar Pakistan. Piv a bourchas azeho dezho ? Daoust dezho bezañ dihelavar a-grenn war gement-se e c'heller soñjal e tegas ar Stadoù-Unanet o lod... Bremañ eo dav d'an harzerezh krañvaat e stourm er c'harioù bras da respont da gadoniezh ar spont... Ma teu a-benn an harzerezh d'en em unvaniñ e c'hello bezañ skoazellet gant ar C'hendalc'h Islamat, ha kaout levezon en Europa hag er Stadoù-Unanet.

*Padrig an Habask*



**azia**

**TUD AN HIMALAYA**



*Broioù an Himalaya*

Tro-dro d'an Himalaya (Chomadur Yen e sanskriteg ; Hima = yen, erc'h hag Alaya = chomadur) eus bevemoù Afghanistan er c'hornôg, an U.R.S.S. ha Sina en hanternoz hag er sav-heol, hag India er su, ez eus tud o vevañ e rouantelezhioù bihan, dieub pe dost, evel Sikkim, Nepal, Bouthan, Mustang, Ladakh, Zanskar, hag all pe dindan yev ar Sinaiz evel bro Dibet.


An dud-se, a orin disheñvel, met Tibetaned koulskoude, a vev hervez un doare-bevañ peurheñvel, unvanet ma'z int gant ar gredenn, ur voutdaegezh dispar, ar voutdaegezh tantrek a zo bet diazezet e bro Dibet e 654 gant ar roue Songtsen. Displeget he deus un doare-bevañ, ur sevenadur hag un arz evel n'eus ket unan.

**AR GREDENN**


Ar voutdaegezh, goude bezañ brezeliet ouzh ar gredenn gozh e bro Dibet, anvet *Bon*, a zalc'he ar vro hag a oa ur gredenn chamaniat hag hud a oa da bal dezhi sujañ hag evezhiañ an traoù dreistnatur, he deus ar voutdaegezh tibetan miret un darn eus ar c'hredennoù Bon hag ivez meur a zouelezh Bon, ar re-mañ deuet da vezañ doueelezhioù gwaredus ar vro. Ar voutdaegezh dibarel-mañ, a zo anvet *Lamaegezh*.

Ar Vouda azeulet gant an Dibetaniz a zo Chenrezig, ar Vouda truezus a zo chomet war an douar evit skoazellañ an dud da c'hounit ar baradoz (an nirvana) hag evel-se da achap diouzh kelc'h-troioù an adenkorfadur.

Ar bedenn gouestlet da Chenrezig "Om Mani Padme Hum" a vez laeret gant an dud a-hed an deiz, skrivet eo er milinoù-pedenn, engravet eo war ar mogerioù-pedenn (Mani) diniver a vez kavet e pep lec'h ha war ar reier a valeg hentoù pirc'hirinezhioù an Himalaya (anvet "mir-c'hi avel"), skrivet eo ivez war ar bannieloù hir ha awenn



*mogerioù Mani*



a strak en avel ; an avel o tegas ar bedenn betek divskouarn an doueelezhioù.  
An Dalai-Lama, penntiern speredel ha bedel an Dibetanz a zo furm bev Chenrezig.

AROUZIOU AR VOUDAEGEZH

Ar skeudenn vrasañ eo **Rod ar Vuhez** : Sindje, Barner ar re varv a zalc'h etre a zent, e zivrec'h hag e zivhar, rod ar vuhez. Homañ graet e tri c'helc'h a ziskouez ar c'helc'h brasañ ar stadoù treuzet tro-ha-tro gant an den, Rannet eo etre c'hwec'h domani :

1. — *Domani an doueou*, eno e vevont eürus. Met ne vo ket ar stad-mañ hollbadus ma vefe ankounac'haet ar gredenn gant an doueou. Neuze e kouezhfent en ur stad a-is evel an dud voutin.
2. — *Domani an Ditaned*, Titaned a zo tud stourmus kriet gant ar warizi.
3. — *Domani an dud*, An dud dalc'het dindan yev al lore'h hag an emgarantez a zo sujet d'ar c'hleved, d'ar gozhni ha d'ar marv.
4. — *Domani al loened*, Al loened dalc'het gant o dougnatur ha prederiet gant kaout boued, o bed a zo bed an diouiziegezh.
5. — *Domani ar spredoù*, Ar spredoù a zo piaouet gant ar c'hoant. Bez' o deus ur c'hof divent hag ur genou bihan-tre peogwir ne zeout ket a-benn da walc'hañ o c'hoantoù.
6. — *Domani ar bedoù ifernus*, Domani ar boan hag ar gasoni.

Hervez ar gredenn voudaek, goude e varv, e adenkorf pep den er bed-mañ-bed diouzh e nsted. Da lavarout eo, ar bed ha dreist-holl ar c'horf o vezañ ur frouezhenn eus ar genouiziegezh, ober a ra an den e-unan korf e advuhez.

Ar c'helc'h bihan e-kreiz ar rod a ziskouez tri loen : ur pemoc'h, ur c'hilhog hag ur sarpan. Arouzioù 3 binim ez int : ar pemoc'h a zo an diouiziegezh, ar c'hilhog ar c'hoant hag ar sarpan eo ar gasoni.


\*Keit ha ma pad an diouiziegezh ha keit ha n'en deus ket an den dizoloet e wir natur hag ar c'hendoareoù a stag anezhañ ouzh ar vuhez ne c'hell ket kaout an distag diouzh kelc'h ar vuhez. Kenderc'hel a raio da vezañ adenkorf en ur stad bennak ha poaniañ a raio. Met ur wech diubet diouzh e hiniernelezh touellus ha diouzh e hurlink a zaoufezh ne vo ket an den sujed d'e c'hoantoù ken. Paouez a raio ar c'hoant, da lavarout eo an nerzh a lak rod ar vuhez da dreiñ hag an den neuze en devo tizhet ar pal diwezhañ da lavarout eo an diubidigezh, pe an Nirvana.

AR MANDALA


Ar *Mandala* a zo ur skeudenn ventoniezh a genreizhadurioù kevrinel furmet gant arouzioù ha livioù. Skeudennet dindan furm ur c'helc'h (oc'h aroueziañ al lec'h glan e vev an doueou ennañ) gant ur c'harrez e-kreiz ar c'helc'h. Ar c'harrez en deus peder dor hag e-kreiz ar c'harrez ez eus ur c'helc'h skeudennet ennañ un doueelezh pe meur a hini. An hent da heuliañ a grog e-maez ar mandala, treuzet e vez da gentañ ar c'helc'h diavaez graet gant tri c'helc'h kenstaget : ur gloued a dan a vez an nor a zo arouez an em-



ur pezh a vez kavet war ur banniel a strak en avel anvet "marc'h-avel"




om mani padme hum engravet war ur maen



ur mandala

skiant o tanañ an diouiziegezh, ur c'helc'h a gurun a arouez ar sklerijennadur, hag ur gurunenn a vleunioù lotuz troet etreke an diavaez a arouez ar verzerzh speredel. Gwasket gant an tri c'helc'h-se emañ mogerioù ar mandala : furmet gant pemp bandenn a liv dishevel ha toulet gant peder dor lec'hiet evel pevar c'horn ar bed ha difennet gant doueelezhioù amik. A-dreñv an dorioù emañ kreiz ar mandala e-lec'h n'eus nag amter hag ec'honder.



ur chorten

A. an eter; B. an heol; C. al loar; D. an aer; E. an tan; F. an dour; G. delwenn Bouda; H. an douar; I. leurenn gant 4 rann; J. dharma; K. sangha.

AR MANTRA

Ar mantra a zo un heuliadenn komzoù kevrinel, alies diliamm, a skoazell an den a breder da lakaat da wir an doueelezh aroueziet gant ar mantra. E berr gomzoù, skignañ a ra ur mantra an nerzh a zo gant an doueelezh pedet hag ar preder a lavar ar mantra betek en em gavout gant an doueelezh pedet. Displegadur ar mantra a zo lod bras al lid boudaek. Ar sonerzh a ya gant displegadur ar mantra : ar simbalennoù, an trompilhoù, ar c'hleierigoù-dorn a son gant an hirvombardoù evit lakaat ar spered da vont gant son ar mouezhioù.


AR MUDRA

Ar *Mudra* a zo ar jestroù. Dreist-holl jestroù an dornioù. Un dalvoudegezh vras o deus an dornioù, kement hag em-zalc'h diabarzh an danevellet.

AR CHORTEN

Ar *chorten* a zo ur savadur bihan a vez kavet dre-holl e bro an Himalaya hag un arouez relijiel eo. Pemp darn a zo ennañ oc'h aroueziañ : an aer, ar spered (an eter), (an heol, al loar), an tan, an dour, an douar. Azezet eo war ur skor a arouez ar Sangha, da lavarout eo ar gevredigezh voudaek, war ar skor emañ an Dharm, da lavarout eo ar gredenn voudaek aroueziet gant loened o virout teñzor ar furnez, a-us ez eus ul leurenn gant peder rann oc'h aroueziañ 4 zennad-hent an araokenn speredel, an darn gomez ha karrezek a zo an douar, war an douar hag en e greiz ez eus ur c'hleuzig ennañ delwenn ar Vouda, goude ez eus un darn gerc'hek a arouez an dour, war an douar emañ an tan, aroueziet gant un darn furmet evel un disheolier, ur c'hresk a arouez al loar, hag ar c'helc'h bihan war ar c'hresk a zo an heol, ar flammig bihan a zo e penn uhelañ ar savadur a zo an eter.

(da vezañ kendalc'het)



T. B.

# capés

STOURM AR C'H.A.P.E.S.  
(kendalc'h...)

N'eus ket pell eo deus an Ao. Mitterrand da Roazhon. N'eo ket alies e teu evel-se ur Rener-ar-Repulik da bourmen e galite er vro-mañ : ar wech-se avat e oa kozshet, steuziet, tavet, aet da get al lazoù-kanañ a veze gwechall o kantikañ en enor da Fañch Mitt. Bremañ n'eus ken na Fañch na Mitt. Setu perak, emichañs, e oa ret dezhañ dont da Vreizh : dav adch'houit tamm pe damm eus ar vrud-vat hag eus al levezon kollet.

Gortozet e oa an Ao. Mitterrand da lavarout un dra-bennak diwar-benn sevenadur Breizh — ha d'ober e dammig prof. Abaoe un nebeut devezhioù e oa deut difreterezh war servijoù an Deskadurezh, prederiet-bras a-greiz-holl gant stad ar brezhoneg : pet disk'bil a oa eno, pet kelemner aze, pet studier o doa tapet kout an aotreegezh, hag all, hag all. Seurt, birvidigezh er broviñs a ziskouez anat emañ Pariz o vont d'ober ur fivavaden, Mouslavaret e veze : "mañ o tont deoc'h, ho KAPES..."

## PER DENEZ

Ha kredet eo bet, ur vunutenn gant lod, div pe deir munutenn gant lod all — un nebeut a gred c'hoazh, met n'eo ken ar re na fello dezho morse diskrediñ — kredet eo bet eta e oa deut ar maoutig e anv C.A.P.E.S. ganeomp. Lavaret en doa an Ao. Mitterrand : "Allet am eus Ministr an Deskadurezh da reiñ ar C'h.A.P.E.S. brezhonek..." stakadegoù daouarn. Ha setu aze un dra vat graet gant an Ao. Mitterrand : lakaat 10.000 den da stakañ o daouarn evit ar C'h.A.P.E.S. Ken kalonek e oa stakadeged ma ne voe ket klevet gant an darn vrasañ ar pezh a zeue da heul : "... ha Lizhiri Modern" (evit ar re n'int ket bet desavat war varlenn an Alma Mater eo koulz din displegañ n'eo Lizhiri Modern nemet un doare all da lavarout, eun-hag-eun galleg). Kavet e oa bet an tu, gant Jakobined ar Minister, da lakaat an Ao. Mitterrand da reiñ ur C'h.A.P.E.S. brezhonek hep reiñ anezhañ.

Gouzout a ran e ranker stourm evit ar brezhoneg war an holl dachennoù : war dachenn ar skingomz, war dachenn ar



(da vezañ kendalc'h et p. 14)

# bro.dreger

TREGERN TREGER



Skol gentañ derez Pabu. Warlene ne oa ken nemet daou glas gant 20 skoliad an holl nemetken e Pabu. E oa ar skol o vont war an diskar. Er bloaz-mañ ez eus un hanter muioc'h hag un trede klas a vo digoret. Burzhud ? Nann. Gant ar brezhoneg an hini eo bet cheñchet penn d'ar vazh. Ar skolaer en deus divizet ober un eurvezh-skol bemdez e brezhoneg; evit ober pep tra (istor, jedoniezh, douaroniezh, sportoù, hag all...). Tud bugale Babu a seblant bezañ a-du gant ar mennoz rak deredek a reont da gas o bugale d'ar skol dereat-se.

Erv Talberzh en arvar. Ma sellit ouzhi kartenn Breizh, er penn-uhelañ, e welit un hir a erv o vont er mor, eizh kilometrad hed e ra, an hini hirañ er bed. Erv Talberzh eo e anv. A-bouez-bras eo evit kempouez ar mor er vro. Met ar pezh zo bremañ eo emañ en dajñer bras. Dija arsaok e vije roet sotreot d'an dud da zont da gerc'hat biñ. Goude al lavr du ez eus bet graet gwashoc'h; tennañ an holl vili



-TADAVAB-

# YEC'HEDE

BUHEZ AR BOESTOU-MIR  
A YA DA GET

Mirout ar frouzsh hag al legumaj da vremañ zo bet atav ur gudenn evit al labourerien-douar hag ar stallou-koñver, pe memes an dud egistompi.

Gwechall e veze lakaet al legumaj da sec'hañ, ar c'hig en holen hag an anduilh da vogedid er siminal. C'hwezsh vat a oa gant ar re-mañ ha blazet 'oant ivez. Tamm ha tamm eo ar boestou-mir hag ar skornerezed o deus kemeret plas ar gizioù kozh. Evel just e vez kavet c'hoazh kig pe anduilh mogedet an deiz a hiriv, met mogedet gant... ur gozrenn ! Kement-se, piv en dije kredet ? C'hoant debriñ ne roin ket deoc'h en taol-mañ c'hoazh, met er gevredigezh-mañ eo ar werzh a gont ha pa vije gwerzhet kaoc'h deoc'h. Profit eo, 'deus ezhomm ober ar greantelerezh : setu pezh 'vez lavaret deomp !

Gant louzoù chimik ivez 'vez klasket mirout ar boued ouz ar breinadur ha diaezamantou zo savet buan rak re zañjerus e oa evit hor yec'hed. Met n'eo ket ijin a vank d'ar re-se : soñjet o deus er skinobererezh.

Tremen a ra boued dindan skinoù  $\gamma$  (gamma). Uhel 'rank bezañ ar skinoberusted dre ma n'eo ket ken aese, evit doare, lazhañ garvillez. Implij a reont 200 k rad, ha pa soñjer e vez lazhet un den gant 4 k rad ne zle ket bezañ ken dizañjer hag e vez lakaet ac'hanomp da grediñ. Ar "k rad" eo an doare da ventañ ar skinoberusted.

E bro C'hall n'eo deus aotre da skinoberezhañ nemet an

avaloù-douar, an ognori, ar chalotez hag ar c'hignen. Er broioù "Benelux" 'vez louzaotet kalz muioc'h al legumaj hag evel just n'eus mud ebet da c'houzout hag-eñ int yec'h pe get : ne vez ket skrivet war etiketenoù ar re-mañ ur wech lakaet e gwerzh er stallou. Ar skinobererezh ne cheñch na stumm al legumaj nag o blaz. Ne vezit ket gouest da anavezout anezho. Gwelet a reer ur wech ouzhpenn eo deomp-ni d'en em zifenn. Finoc'h egeto 'rankomp bezañ. Pell zo eo bet prouet e oa dajñjerus ar skinobererezh, setu penaos e c'helle seurt boued bezañ yec'h ha mat da zebrid !

Ur gudenn all a sav c'hoazh evit ar boued-se : kudenn an dud a rank labourat er greantelerezh-se. Al lezennou surentez n'int ket bet embannet evit c'hoazh : e gwirionez ne anavezomp ket kalz a dra diwar-benn ar stallou a ra ur seurt labour.

Gouzout a rit re vat e tigresk niver ar vugale a varv goude bezañ ganet, abaoe penn-kentañ ar c'hantved-mañ. Klevet ho peus ivez kaozeal eus ar c'houmoul skinobereriek a lamm kuit eus ar c'hreizennou nukleel. Merzet ez eus bet e kresk en-dro niver ar vugale marvet goude bezañ ganet e-lec'h ma vez kavet skinobererezh en aer. Gwashoc'h eo c'hoazh marteze, pa ouezer ne oa ket uhel tregantad ar skinoberusted er mare ma oa bet graet an enkask-se.

Sarret e vo kreizenn nukleel Breizh 'benn un nebeud amzer, hag un implij nevez 'm eus kavet dezhi : skinobererezh ar boued marteze ?... Piv oar ? Gwelet e vo a-benn nebeut...

Agnès Simon

skinwel, war dachenn ar vuhez foran, war dachenn ar skolioù-mamm, war dachenn ar skolioù kentañ, hag all, hag all. A-bouez eo pep stourmad. Evidon-me a stourm war dachenn ar Skolioù-Meur hag ar Skolioù Eil Derez. Bez' e c'hellan lavarout ne vo ket a gelennadurezh vrezhonek da vat, en eil derez, 'keit ha ne vo ket ur C'h.A.P.E.S. brezhonek.

N'eo ket ganeomp-ni eo bet dibabet an doare da lakaat ar gelennerien e karg. Ne lavaromp ket eo an doare gwellañ a zo bet dibabet gant Bro-C'hall, pell ac'han. Un dra 'zo avat : er skolioù evel m'emañ, er gelennadurezh evel m'emañ, n'heller dont da vezañ kelenner nemet dre ober berzh en ur genstrivadeg : an div anavezetañ o vezañ ar C'h.A.P.E.S. hag an *Agrégation*. A-hend-all e vezer kelenner-skouzell, kelenner-berriad, kelenner-diwar-dermen ha diwar-dremen, kement a garoc'h, hep nebeut a wirioù. Ha peogwir n'eus ket a g.C.A.P.E.S. brezhonek, n'eus ket a gelennerien vrezhonek ivez. An dud a lavar ez eus bremañ n'ouzon pet kelenner brezhonek er c'holoioù ha liseoù a zo o c'hoari gant ar gerioù ha gant ar fedoù : bez' ez eus kelennerien o reiñ kentelioù brezhonek — muioc'h pe nebeutoc'h — met kelennerien istor, jedoniezh, saozneg, h.a., int hag e chomont. Eurvezhoù kelenner brezhonek a zo bet fiziet enno, setu holl. Hag evit bloaz hepken. Hag-efi o devo c'hoari er vrezhonek a zêu — a-benn daou vloaz — a-benn tri bloaz, den ne oar. Int ne ouzont ket. O skolidi nebeutoc'h c'hoazh.

Ne fell ket d'ar Ministr kaout kelennerien vrezhonek. Bez' e rank ur c'helenner reiñ war-dro 18 eurvezh kentelioù ar sizhun. Kentelioù war e zanvez. Ma vefe ur C'h.A.P.E.S. brezhonek e vefe kelennerien vrezhonek, da lavarout tud o kelenner brezhonek 18 eurvezh ar sizhun hag an dra-se betek an oad a 60 vloaz. Anat eo e lakafe seurt kelennerien o foan da gaout ha da gavout skolidi, da vroudañ ar re yaouank da zibañ ar brezhoneg evel danvez studi — anat eo e rafent bruderezh evit hor sevenadur — ganto ar gwir da c'houlenn groñs ha start ur plas dereat evit ar brezhoneg er skolioù. Ne fell ket da dud ar Minister kaout an dra-se rak — evel evit an aotreegezh — ne vefe ket tu da zont war gil. An traoù na c'hellont ket bezañ

(da vezañ kendalc'het p.16)


Hep tamm mezh ebet. E Plounerin ez eo bet adlodenet ar vro evel e meur a lec'h all. E penn-kentañ miz C'hwevrer eo deuet an "Aozadur evit an Adlodennañ" er barrouz evit displegan penaos ober gurzher evit terrañ nerzh an avel. Hag i da ginnig o servijoù, en ur baeñ evel just. Distruj, dresañ, addistruj evit adresañ, bepred ez eus ar c'ham da c'honit.

N'eus forzh petra. Emañ arc'hant digoll an "Amoco Cadiz" o vont d'ober e lany war ar vro a-benn ur pennadig, kredapl. Dija emañ en soñj ar c'hunioù da zispign anezhañ. Evel en Treoù-Tregigneg da skouer. Eno e vo savet un ti-kêr nevez, unan kaer, unan dreist. Lorc'h evit 1.200 den ar barrouz ha dreist-holl evit ar maer, an Ao. Kont de Boisriou, o chom e kastell Koaotriou, anavezet gwelloc'h dindan an anv a "Monsieur Hervé". Laouen e vo sur-mat ivez pesketaerien rivinet ar vro hag ivez an evned o deus gouzañvet int a-vil-vern...

Hag e kaozeer en-dro deus ur greizenn nukleel e Beg ar Fri (Gwimae). Ha c'hoazh Kuzul Jeneral Penn ar Bed o c'houlenn groñs hag oc'h embann e pep lec'h e vije savet ur greizenn nukleel en departamant. Beg ar Fri a oa bet soñjet ennañ a-raok dija da vare Plogo. Tu dehoù ha PCF a-unvouezh. Ar PS diouzh e du o chom dilavar, n'eo ket evel re bro Naoned a zo savet nevez zo a-du gant kreizenn ar C'harned. Maer PS Gwimae en a zo savet a-enep, skoazellet e vo gant e vignoned ? An EDF ne gred ket dont da Vreizh, chom a ra bepred e Pariz evit brudañ e vennoz diazez : ur greizenn en Breizh m'hou eus c'hoant stourm a-enep d'an dilavar !

Buhez politikel ar vro. Henri Blandin, maer kozh Lannuon zo a-du evit ma vefe Breizh ur Stad-kevredet (evel Kaledonia Nevez).

N'omp ket F.L.B., n'omp ket Breiz-Atao, nag U.D.B. zoken (sic) eme ar PS, daoust da se en em gavomp un tamm kanak en hon bro emez. Marcel Guéguen, ex-PCF-Frzhin, en deus tamallet gary laoskentez ar Stad evit pezh a sell he laoskentez dirak tud S.A.B.



## LABOUSED

Ar SKOUL GLAS  
(*Circus pygargus*)

Un toullad mizioù zo ez eus bet kaoz er c'helaouennoù eus ur skoul glas<sup>1</sup>, ul laboused-preizh a zeu da sevel e neizh war menez Gellegetre Lokarn ha Sant Nigouden. Eno ez eus lannoù war meur a zevezh-arat. Aloubet eo bet an tolead gant trikamardourien bouzarus ha flaeurius, paotred ar "moto glas" (trial). Un todilhon ganto, peadra da vouzarin ur pot-houarn ! Ar skouled glas deuet eus bro Etiopia betek Lokarn da neizhiañ ne voent ket gwall blijet, 'redit ac'honan ! E 1981, ne chome nemet daou goublad kalonek pe diskiant ha marteze bouzar war lannoù Lokarn. Ne vo mui eus ar redadegoù droc'he-se met re all a zo savet abaoe. Emañ kanfarded ar C'h.O.G.E.M.A. o soñj turiañ an douar er c'horn-bro-se ivez evit klask uranion. Gwashat oberiantiz ! An aotrou Jonkour, ur mezeg-loened eus e vicher, n'eo ket chomet da sorbin, savet en deus ur gevredigezh evit mirout glan lannoù Menez Gelleget. Salv ma teuo a-benn !

Kinglav a ra. Gant kerzhed er sodelloù-karr ez eo leun-bri va botou-nizoù hag aet og an den un disterig. Laboused ebet war wel. Trumm a-dreñv ur c'harzhad haleg e welan ul laboused-preizh teñval o plaviñ,

goustad. Ul lost hir dezhañ ha divaskell ken hir all. E zivaskell n'int ket ken lemm ha begek evel re ar falc'huned. Mistroc'h laboused eo eget ar skoul gwenn (*Circus cyaneus*). Ur skoul glas eo ! E nijadenn a seblant lijer evel hini ur skravig. Ma forn digor ganin e choman aze, skodeget, da sellet outañ. Ur par eo hemañ, liv ar maen-menez gant e stuc'h ha goude plaviñ ur herrad gant e zivaskell digor-frank (evel ur V) en deus sachet e skoul gantañ pelloc'h. Alies-gwech e vez mesket ar skoul glas gant ar skoul gwenn. Aze emañ ar galedenn gant al loened-pluñv-se ! Heñvel-poch eo ar pazed. Mistroc'h un disterig eo pazed ar skoul glas ha ledanoc'h an takad gwenn war e bilost. Rous-ruz int o-div. E Breizh avat, ez eus muioc'h eus ar skouled glas o sevel o neizh. War ar menezioù Du, Are pe lannoù bro Wened e vezont kavet. Atav e vez an neizh war an douar. Un nebeud blenchoù a zegaso ar skoul glas evit diwall ar vîoù ouz ar vouestoni. Ar par eo a vago ar c'hlodad laboused yaouank hag ar barez. Ral eo e pakfe laboused all. Peurvuiañ e tibabo rousegi, naered, logod-mors, bovelened, boutzelled ha c'hwiled a bep seurt, a-wechoù e



## PSI KOZH-NOE





skrapo e viod digant an alc'hweder. Ar skoul glas ne beg ket alies ha ral eo e savie katailh etrezo. Gêroudet a gont en e levr<sup>2</sup> ez eus bet gwelet ur par oc'h en em barat gant div barez ! Hag ar par kalonek a vago an daou dorad hag an div barez !

Tudual Huon

<sup>1</sup> Ar skoul glas a vez lavaret e Plogastell Sant Jermen.  
<sup>2</sup> P. Gêroudet "Les Rapaces" Delachaux & Niestlé.

Sparfell al lannioù (journal bro Naous)  
Ar sparfell glas (Poullaouen) F, Fréau, Planedenn 13/14  
Ar vaou logod (Pleuven)

diverket, an traoù na c'hellont ket bezañ skarzhet kuit eus an eil devezh d'egle an hini eo a spont anezho. Pezh a blij dezho eo kelennerien evel m'o deus bremañ : tud a c'hell bezañ tennet o c'hentelioù diganto hep m'o defe gwir ebet da glemm : "Digareziñ aotrounez, n'eus ket mui a skoldi ! Ni a vije ken laouen, met ar re yaouank ne c'houlennont ket ha n'oulont ket..."

Dre forzh stourm, dre forzh ober bruderezh, e oa deut kudenn ar C'h.A.P.E.S. da vezañ anavezet mat. N'helle ket mui hor mistri ober skouarn vouzar. N'hellent ket mui lavarout "nann" evel un tammig de Monzie pe Debré bernak. Ijinet o deus ur C'h.A.P.E.S. daoubennek gant kelennerien "daouzenvezek" : kelennerien a c'hell kelen, a bep eil, galleg pe vrezhoneg. Da lavarout eo kelennerien n'o devo ket ar gwir da c'houlenn ober o servij e brezhoneg, kelennerien a c'hell bezañ lakaet da gelenn galleg un tammig — galleg dreist-holl — galleg hepken, kerkent ha ma vo aet berrik ar goullenn war ar brezhoneg. Ur wech c'hoazh — setu un nebeut bloavezhioù gounezet — o deus bet hon enebourien pellaet, argaset, skarzhet spontailh ar c'helenner brezhonek. Ha klasket ganto, war ar marc'had, kaout an anv da vezañ bet graet ur prof bras !

Perak ur C'h.A.P.E.S. brezhoneg-lizhiri modern — ha n'eo ket ur C'h.A.P.E.S. brezhoneg-douaroniezh, da skouer ? N'eo ket an "daoubennegezh" un ijinadenn nevez. Dija, en amzer an Itron Alice Saunier-Seité, e oa bet aozet, evit Skol-Veur Brest mar plij, un aotreegezh daoubennek : brezhoneg-saozneg. N'he doa ket bevet an euzhadenn-se hiroc'h eget al leue daoubenn a veze diskouezet gwechall er sirk : ur bloavezhig, ha hi aet gant al langis diwar an diouer a studierien. Perak ar wech-mañ avat "brezhoneg-galleg" ha n'eo ket mui "brezhoneg-saozneg" ? Peogwir ez eus ur C'h.A.P.E.S., hag unan hepken, a zo ennañ un "danvez all da zibab dre ret" (option obligatoire), hag ar C'h.A.P.E.S.-Lizhiri Modern an hini eo : gant ar C'h.A.P.E.S.-se, ouzhpenn ho tanvez pennañ hag a zo ar galleg, eo ret deoc'h dibab danvez un adarnodenn -douez 15 yezh all hag a zo : alamaneg, saozneg, spagnoleg, italianeg, rusianeg, arabeg, sianeg, portugaleg, gresianeg, latinieg, hebraeg, poloneg, nederlandeg, tchec'heg ha roumaneg. Un arnodenn dre skrid koulz hag un arnodenn dre gomz war an danvez-se o kontañ evit un drederenn eus an arnodenn en he fezh. Anet eo ne oa ket ezhomm skrapañ pell an toull-kil evit kaout ar soñj burzhudus : lakaat ar brezhoneg da c'hwetekvet danvez-arnodenn.

Kemeret en deus ar Minister ar boan da respont din — trugarez ! — ne oa ket an drase an hini a oa en o fenn : "dont acte," e-giz ma lavarer e galleg. Petra 'zo en o fenn, siwazh, n'o deus ket kavet dereat lavarout, ha den "kiriek" ebet, o c'houlennata tud "kiriek", n'eo bet gouest da gavout. D'ar mare m'adon o skrivañ, teñ sihan goude gweladenn an Ao. Mitterrand, ne ouzer ket c'hoazh petra 'vo an daoubennegezh-se ! Koulskoude memes tra, n'eo ket bet lakaet an Ao. Mitterrand da gomz diwar skañv !

Ne weler ket gwall vat penaos e c'hello ar Minister diluziñ e neudenn en afer-se. Evit kaout an aotre d'en em ginnig 'en ur genstrivadeg C.A.P.E.S. e ranker kaout an aotreegezh kenanv : da skouer, evit ar C'h.A.P.E.S. saoznek an aotreegezh saoznek. Ha setu bremañ neuze 'ta ur C'h.A.P.E.S. gant daou zanvez (ha keit-ha-keit an eil gant egile

anat eo ! piv biskoazh a yafe da soñjal e c'hellfe bezañ gant ar C'h.A.P.E.S. daoubennek-se ur penn bras hag ur penn bihan — e vefe roet muioc'h a blas d'ar galleg ha nebeutoc'h d'ar brezhoneg ?) : ret e vo neuze 'ta kaout div aotreegezh, an aotreegezh war ar brezhoneg hag an aotreegezh war al Lizhiri Modern. Koulz ha lakaat an traoù da vezañ aesoc'h ! War an 32 gellenner a zo bremañ o reiñ kentelioù brezhonek, e framm o implij-amzer, en eil derez, n'eus nemet 5 hag o defe un aotreegezh Lizhiri Modern ! Petra 'raio ar 27 all ? Lakaomp : unan en defe gounezet an aotreegezh saoznek, 3 bloavezhad labour da nebeutañ. Goude-se en saoznek gounezet un aotreegezh vrezhonek : 2 pe dri bloavezhad all. Bremañ, avat, ma fell dezhañ en em ginnig evit ar C'h.A.P.E.S. nevez, e ranko da gentañ gouint un tredo aotreegezh, war al Lizhiri Modern ar wech-mañ : ha setu 2 pe 3 bloavezhad all ! Gwashoc'h eget dont da vezañ medisîn — pe person ! — Evit pezh a sell ouzh ar studierien ez eo ken skedus all an traoù : e-touez ar re a zo enskrivet er bloaz-mañ evit an aotreegezh vrezhonek n'eus bet kavet nemet 2 war 94 a oa ganto un aotreegezh Lizhiri Modern ! Ma vije bet klasket ijinañ ur genstrivadeg dic'hallus d'an dud lakaat o anv eviti, ne vije ket bet graet bravoc'h taol.

Un dra all c'hoazh. Bep bloaz e vez roet da bep skoll, gant ar Ministr — an digreizennoù eo emichañs ! — e-urvezhoù-kelenner evit kas en-dro an deskadurezh. Nevez 'zo eo bet cheñchet an traoù : ne vez ket mui roet e-urvezhoù evit ar saoznek (da vezañ implijet evit ar saoznek), e-urvezhoù evit ar galleg (da vezañ implijet evit ar galleg), h. a., evel a-raok. Bremañ e vez roet an e-urvezhoù a-vloc'had, gant arzh-mañ, ma c'hoarvez d'ar gont bezañ berrik : pourchas e-urvezhoù da gentañ-holl d'an danvezioù pennañ. Setu perak ez eus bremañ skolioù e-lec'h ma vez graet en un e-urvezhanter ar skiantoù natur hag o deus ar gwir, hervez reolenn, da gaout div e-urvezh ! "Michañs e labourer buanoc'h ! Hag-eñ avat e vo kontet ar brezhoneg e-touez an danvezioù pennañ ? Dreist-holl gant kelennerien a c'hello, hep poan hag hep kudenn, bezañ lakaet da c'hallegeñ a-hed an amzer... Selaout 'ta : daoust ha savet ez eus ur ger, e brezhoneg, evit lavarout "eutanaziezh" ? Ma n'eus ket bet, e vefe poent — keit ha ma c'heller hen ober c'hoazh.

Un hanter-g.A.P.E.S. n'eo ket ur C'h.A.P.E.S. Ret eo derc'hel da stourm. Unvan eo war ar poent-se an emsav sevenadurel. Laouen eo ar F.E.N. ? Laouen e oant dija gant hanter-aotreegezh an Itron Alice Saunier-Seité ! Ne vern deomp. Pezh a vern deomp eo dazont hor yezh ha dazont hor re yaouank.

Evit gwir ar re yaouank d'al labour.  
Evit o gwir da labourat er vro.  
Evit hor yezh hag hor sevenadur — dalc'homp da stourm.

Per Denez

Sinet, lakaet da sinañ ar c'houlennadeg d'an Ao. Mitterrand evit ar C'h.A.P.E.S. Bez' e c'heller goulienn ar follennou-da-sinañ digant Per Denez, Université de Haute-Bretagne, 6 ave. Gaston-Berger 35043 ROAZHON Cédex. Ur wech sinet eo gwelloc'h kas ar follennou-en-dro da bPer Denez evit ma vefent kaset a-stroll d'an Ao. Mitterrand.



# roazhon

AR C'HENDALC'H KELTIK E TREVROADEL  
E ROAZHON AR BLOAZ-MAN

E Breizh e vo dalc'het ar bloaz-mañ ar C'hendalc'h Keltiek E-trevroadel.  
Goude an Naoned e 1974, Lannuon e 1981, e vo kêrbenn Vreizh o tegemer anezhañ etre an 17 hag ar 17 a viz Eost 1985.

Pleustret e vo war lec'h ar yezhoù keltiek er vuhez a-vremañ. Studiet e vo kudennoù an embann er yezhoù keltiek, an embannadurioù evit ar vugale dreist-holl, lec'h ar yezhoù keltiek er mediaoù (fifiskenneriezh, video, skin-gomz ha skinwel) hag er vuhez foran, hag ivez teknikoù modern ar c'helenner.

Ouzhpenn al labourioù-se e vo kalzik a draoù all : ur bourmenadenn, diskouezadegoù ha filmoù, ha bemnoz e vo abadennoù gant perzhidi eus an holl vroioù keltiek : sonerezh, koroll, kanaouennoù, fest-noz.

Evit kaout titouroù, skrivit da :  
Kendalc'h Keltiek E-trevroadel, 7 E-trevroadel kêr Roazhon  
7 kae Chateaubriand 35000 ROAZHON



## LENNIT



## GHOLORI Kebouenn ar vugale!


— BEP MIZ —

Koumanant : 135,00 L. ar bloavezh  
(120,00 L. adal un eil koumanant)  
70,00 L. evit c'hwec'h miz

GHOLORI  
Agnes Simon  
Kec'henn  
PLOUIDER  
29260 LESNEVEN  
(chekenn en anv "An Here")

# skinwel

; FANCHIG SUPERSTAR !



*Travalc'h !* Trist evel Doue Pleuveur met ur gounnaruz o virviñ en e greiz ez eo dispaket hor Fañchig broadel war ar skrammoù. *Travalc'h !* emezañ hep na demat na trugarez ! Chom a ran batet, ma genoù digor war nav eur hanter. Gant un tamm diegi em boa lakaet ma fost da vonet en-dro. Steuziet kenkent ha tra eo ma nec'hamant. Emaon o vonet da vevañ ur momed istorel, a soñjis war an taol, ... euriou meur hon zebe brezhonek : Fañch Broudig, aet e fulor, skarzhet gantañ e holl seveded : kaout a ra din emañ o vont da zibunañ, da skeiñ e-kreiz hor fasoù, ur wirionez eus an dibab, gant un nerzh didrec'hus... un dra bennak a cheñcho ar vuhez war an tamm ledenez vrugek-mañ ! Ma bannac'h aporo ha digor-kalon em dorn dehoù, pemzek a gakaouetennoù em dorn kleiz (evel ma lavar-ef) on prest da zegemer pep tra : Fañch oc'h embann d'ar bed-holl e vez graet al lu gant Pobl Vreizh, ez eo poent sevel ha mont d'an emgann; Broudig oc'h anvaz ez eo bet a-viskoazh ul lakez met hiviz-

ken e vo ur gour... Met marteze simploc'h an traoù... e oa o vont da damall a-fas d'ar bed e oa aet skuiñz gant ar pennañ flemmus savet e-sigur e emziskouezioù war vannañ ar gelaouenn "Al Larv". Prest e oan eta da glevout pep tra, zoken traoù n'helle ma faour-kaezh empenn meizañ, ken pell mat'z eo diouzh predriadennoù ha bed ar skinwel. *Travalc'h !* Aet eo skuiñz an dud. *Ar vretoned a zo ar skuiñz !* A, kregiñ a ra mat, emve, etre ma chik ha ma chok. Ne santan tra ken eus ar bed en-dro din. Ma boud a-bezh, ma holl santadurioù a zo troet war-zu an ardivink. *Travalc'h gant ar yenien*, emezañ c'hoazh. Pladadoufez ! Aet ar c'hazh da ruz, ma n'eo ket da lanne... Skodeget e choman un eilennig c'hoazh. Badaouet. Kement ha spi hag a c'hoanag diwanet ennon ha sur-mat e kalon an holl Vretoned kar-o-bro skubet evel poultrenn dindan avel walarn. Hag ar spiker o kenderc'hel da gunjenniñ ar jeneral goañv.

Disaouzanet ez astennan ma div a c'haroù (eh ya) evit sellout ouzh peurrest an abadenn. Ur wech c'hoazh n'eo bet "Breizh O Vevañ" nemet "Breizh O Vervel" : ur gwir skoop ! Emañ Kreiz-Breizh o



vervel. N'eo ket permetet ober seurt abadennoù divalav... Digwener a-raok hor boa bet tro da welout un abadenn e brezhoneg war an Aikido. Neket gwall entanus a c'heller soñjal da gentañ. Ya, met graet gant un den barrek, ez eus tu d'ober un abadenn bilius, dedennus, fentus, un abadenn kenkouiz ha n'eus forzh pehini a galleg pe welloc'h zoken. Ha neuze paourkaezh bugale, a-raok e oa traoù mat evite. Bremañ n'eus ken nemet Kernôa. Evit kas an dud d'ober o c'houk-aez. Daonet 'vo, koulskoude ne vefe ket dies an koustus lakaat tresadennoù-firiv bet prenet dija gant FR3 e brezhoneg (Lucky Luke, Korfeskernor, ha me oar-me... pe Benny Hill !)... A-benn ar fin n'eus nemet un dra hag a zo mat eo "Mouchig-Dall" ! Met ar pep gwashañ moarvat ez eo ar vandenn-ginnig, ral a wech e vez tu gwelet traoù ken reïgar...

L. Ejen

## ADKOUMANANTIT E POENT

HA BREMAÑ...UN EKSPOZISION HAG UN DISKOUIZADEG TAMHOÙ KOZH-HOUARN E BREST



AR PEZH ZO, E C'HWITAN JACQUES MARTIN BEP SUL BREMAÑ...



## AL LIAMM



KELAOUENN LENNEGEL  
BEP DAOU VIZ

koumanant-bloaz ..... 120 lur  
studieren, soudarded, tud dilabour ..... 100 lur

kas ar chekennoù da :

P. Le Bihan  
16 rue des Fours-à-Chaux  
35400 SAINT MALO  
CCP 167 20 W Roazhon

## UR YEZH EVIT AN URZHIAEAEREZ

An Aymara, ur yezh indian deus Amerika ar Su komzet gant kouerien ha meserien (lamaed 'vel just ! ha n'eo ket defived), a zo bet dibabet gant ur matematiker bolivian evit sevel ur program troidigezh war un urzhiaerezh. Un taol-kaer eo rak ar wech kentañ eo e teu unan bennak a-benn da ober ur seurt program. Ne oa tu, betek-hen, da lakaat gant un urzhiaerezh nemet ur yezh en ur yezh all : galleg-saozneg, da skouer, pe saozneg-germaneg, hag all.

Gant ar program en deus savet Ivan Guzman de Rojas e vo tu da lakaat ur skrid e saozneg e pevarzek yezh all war un dro. An tizh a vo kant ugent ger ar vunutenn. Implijout 'fa program Guzman an Aymara evel yezh hanterour. Komzet e vez Aymara gant daou vilion hanter a dud o chom war ribloul al lenn Titikaka, war an harzoù etre Bolivia ha Perou. N'eo ket, avat, ur yezh skrivet. Ar spagnoleg eo ar yezh ofisiel. Koulskoude, goude studiañ ar yezh-se, en deus kavet Guzman e oa ken lojik ha ken eus ar sintaks anezhi ma oa an hini aesañ hervezañ evit bezañ implijet evel yezh kenetre eus e program.

Para ? a soñjas pennoù-bras, dibab an aymara, ur yezh vihan, dianaz dezho, evit lakaat un urzhiaerezh da vont en-dro ! Biskoazh kemend-all ! Setu kavet ganto arguzennoù evit dismegañsiñ an tammig yezh-se ; ur yezh simpl eo, re simpl, peogwir n'he deus ket kemmet abaoe 4.000 bloaz ! (Deut eo an "den gouez" da vevañ un den a breder, cheñchet an doare-bevañ, nevesaet an teknikoù hag all, met ar yezh, hi, n'he deus ket kemmet... Ur souezh, neketa...)

Washoc'h : n'eo sichennet ar yezh kozh-se "war netra". (Ar yezhoù all, evel just, komz a ran amañ deus ar yezhoù bras, a zo sichennet war un "dra" bennak. Karout 'rafemp gouzout peseurt diforc'h 'zo etre "netra" an aymara ha "tra" bennak ar yezhoù meur). Skrivet o deus ivez kelenourien pennoù hir diwar-benn "ster lojik ar yezh", ar yezhoù "fetis" ha "difetis", ha me oar-me petra c'hoazh. Ober fae war ur yezh, dismegañsiñ anezhi a zo un doare da zismegañsiñ ar peñnoù-bras, ar skiantourien nuli-se, ar yezhonourien droc'h-se, n'o deus ket kemmet abaoe kantvedoù. Kalz bravoc'h 'vie bet ma nie Ivan Guzman dibabet ar saozneg, ar galleg pe ar spagnoleg (da skouer) da sevel e program. Yezhoù bras, yezhoù leun a gultur, yezhoù a sevenadur... peogwir o deus renet war impalaerezhioù e-pad kantvedoù !  
Labourer en deus Guzman e-pad pemp bloaz e La Paz evit sevel e program anvet gantañ *Atamari*, pezh a dalvez "jubennour" en aymara. Met dav eo bet dezhañ labourat 'pad e amzer vak (piv en dije gopret ur seurt danvez-labour, an *Alliance Française ?!*) ha war un urzhiaerezh kozh en doa amprestet digant ur mignon. Hag emañ Guzman o paouez lavarout nann d'ur c'hinnig-labour graet gant ur mell stal amerikan, an hini vrasañ war varc'had an ordinarour. Dibabet 'n eus chom en e vro ha stourm evit an aymara ne vez ket kelennet er skolioù hag a vez disprizet gant renerien ar vro. Diskouezet e vez 'vel ur yezh "hep dazont". E-giz ar beizanted indian a ra ganti bemdez, 'michañs ?

Tim Ogouboul

## DIVIZ

- Peseurt ardivink an diaoul a welan aze Kluchet, evel ul labous-preizh marnaoniet ?... Ur post-tele ! Sapre pemzeg !
- Petra 'ri !
- Allies e chomez da soriñ dirak an ardivink-se e-giz ur veuzeulenn ?
- A bep eil... ar wirionez 'zo kasas d'an neb a zo kablust
- Fabius ?
- Borodus.
- Anzav a rankas an tele-nour (ger arnevez) (kinnig all : Teleue) e selle muioc'h eget d'e dro ouzh ar benveg-vil-se, dreist-holl pa veze Carole Laure war ar skramm, gant he daoulagad kement ha loaiou-dour, he fennad blev evel ur vouarenn. Ya, anzav a rankas e veze e e seizh plijadur warn-ugent !
- Mut e choman evel un toull-bez pa glevan seurt drochoni !
- Klenk da ribod ha selaou ! Kalonek e vezan a-wechoù memes tra ! Dec'h em eus sellet ouzh abadenn birvidik "Chadenn ar Vro" !
- Ur chadenn, ya sur ! Huallet omp e-giz ar yer e Bear !
- Yer huallet ?
- Re wir !

# skinwel

FAÑCHIG SUPERSTAR !

*Trawalc'h* / Trist evel Doue Pleuveur met ur gounnar ruz o vevañ en e greiz ez eo dispaket hor Fañchig broadel war ar skrammoù. *Trawalc'h* / Emeañ hep na demat na trugarez / Chom a ran batet, ma genoù digor war nav eur hanter. Gant un tamm diegi em boa lakaet ma fost da vonet en-dro. Steuzlet kenkent ha tra eo ma nec'hamant. Emaon o vonet da vevañ ur morned istorel, a soñjits war an taol, ... euriou meur hon zale brezhonek : Fañch Broudig, aet e fulor, skarzhet gantañ e holl sevended : kaout a ra din emañ o vont da zibunañ, da skeiñ e-kreiz hor fasoù, ur wirionez eus an dibab, gant un nerzh didrec'hus... un dra bennak a cheñcho ar vuhez war an tamm ledenez vrugek-mañ ! Ma bannach' aporo ha digor-kalon em dorn dehoù, penzek a gakaouetennoù em dorn kleiz (evel ma lavar-er) on prest da zegemer pep tra : Fañch oc'h embann d'ar bed-holl e vez graet al lu gant Pobl Vreizh, ez eo poent sevel ha mont d'an emgann; Broudig oc'h anvaz ez eo bet a-viskoazh ul lakez met hivizi-

ken e vo ur gour... Met marteze simploc'h an traoù... e oa o vont da damall a-fas d'ar bed e oa aet skuizh gant ar penna- doù flemmus savet e-sigur e emzikouezioù war vannaù ar gelaouenn "Al Lanv". Prest e oan eta da glevout pep tra, zoken traoù n'helle ma faour-kaezh empenn meizañ, ken pell ma'z eo diouzh prederadennoù ha bed ar skinwel. *Trawalc'h* / Aet eo skuizh an dud. Ar vretoned a zo aet skuizh / A, kregiñ a ra mat, emeve, etre ma chik ha ma chouk. Ne santan tra ken eus ar bed en-dro din. Ma boud a-bezh, ma holl santadurioù a zo troet war-zu an ardivink. *Trawalc'h gant ar yenien*, emezañ c'hoazh. Pladadoufez / Aet ar c'hazh da razh, ma n'eo ket da laneg... Skodeget e choman un eilennig c'hoazh. Badaouet. Kement ha spi hag a c'hoanag diwanet ennon ha sur-mat e kalon an holl Vretoned kar-o-bro skubet evel poultrenn dindan avel walarn. Hag ar spiker o kenderc'hel da gunujenniñ ar jeneral goañv.

Disaouzanet ez astennan ma div a c'haroù (eh ya!) evit sellout ouzh peurrest an abaden. Ur wech c'hoazh n'eo bet "Breizh O Vevañ" nemet "Breizh O Vervel" : ur gwir skoop / Emañ Kreiz-Breizh o



vervel. N'eo ket permetet ober seurt abadennoù divalav... Digwener a-raok hor boa bet tro da welout un abaden e brezhoneg war an Aikido. Neket gwall entanus a c'heller soñjal da gentañ. Ya, met graet gant un den barrek, ez eus tu d'ober un abaden blijus, dedennus, fentus, un abaden kenkoulz ha n'eus forzh pehini e galleg pe welloc'h zoken. Ha neuze paourkaezh bugale, a-raok e oa traoù mat evite. Bremañ n'eus ken nemet Kernôa. Evit kas an dud d'ober o c'houk-aez. Daonet 'vo, koulskoude ne vefe ket diaes na koustus lakaat tresadennoù-fifiv bet prenet dija gant FR3 e brezhoneg (Lucky Luke, Korfesknor, ha me oar-me... pe Benny Hill !)... A-benn ar fin n'eus nemet un dra hag a zo mat eo "Mouchig-Dall" ! Met ar pep gwashañ moarvat ez eo ar vandenn-ginnig, ral a wech e vez tu gwelet traoù ken reñgar...

L. Ejen

## ADKOUMANANTIT E POENT



### UR YEZH EVIT AN URZHIAEREZ

An Aymara, ur yezh indian deus Amerika ar Su komzet gant kouerien ha mesaerien (lamed 've) just l ha n'eo ket defived), a zo bet dibabet gant ur matematiker bolivian evit sevel ur program troidigezh war un urzhiaerezh. Un taol-kaer eo rak ar wech kentañ eo e teu unan bennak a-benn da ober ur seurt program. Ne oa tu, betek-hen, da lakaat gant un urzhiaerezh nemet ur yezh en ur yezh all : galleg-saozneg, da skouer, pe saozneg-germaneg, hag all.

Gant ar program en deus savet Ivan Guzman de Rojas e vo tu da lakaat ur skrid e saozneg e pevarzek yezh all war un dro. An tizh a vo kant ugent ger ar wunutan. Implijout 'ra program Guzman an Aymara evel yezh hanterour. Komzet e vez Aymara gant daou vilion hanter a dud o chom war ribioù al lenn Titikaka, war an harzoù etre Bolivia ha Perou. N'eo ket, avat, ur yezh skrivet. Ar spagnoleg eo ar yezh ofisiel. Koulskoude, goude studiañ ar yezh-se, en deus kavet Guzman e oa ken lojik ha ken eun ar sintaks anezhi ma oa an hini aesañ hervezañ evit bezañ implijet evel yezh kenetre en e brogram.

Para ? a soñjits pennoù-bras, dibab an aymara, ur yezh vihan, dianav dezho, evit lakaat un urzhiaerezh da vont en-dro / Biskoazh kemend-all / Setu kavet ganto arguzennoù evit dismeñsiñ an tammig yezh-se : ur yezh simpl eo, re simpl, peogwir n'he deus ket kemmet abaoe 4.000 bloaz ! (Deut eo an "den gouez" da vezañ un den a breder, cheñchet an doare-bevañ, nevesat an teknikoù hag all, met ar yezh, hi, n'he deus ket kemmet... Ur souezh, neketa...)

gwashoc'h : n'eo sichennet ar yezh kozh-se "war netra". (Ar yezhoù all, evel just, komz a ran amañ deus ar yezhoù bras, a zo sichennet war un "dra" bennak. Karout 'rafemp gouzout peseurt diforc'h 'zo etre "netra" an aymara ha "tra" bennak ar yezhoù meur). Skrivet o deus ivez kelenourien pennadoù hir diwar-benn "ster lojik ar yezh", ar yezhoù "fetis" ha "difetis", ha me oar-me petra c'hoazh. Ober fae war ur yezh, dismeñsiñ anezhi a zo un doare da zismegañsiñ ar re a ra ganti. Tuet a-walc'h on da grediñ ez eo imenezioù ar pennoù-bras-se, ar skiantourien nul-se, ar yezhonourien droc'h-se, n'o deus ket kemmet abaoe kantvedoù. Kalz bravo-c'h 've bet ma nie Ivan Guzman dibabet ar saozneg, ar galleg pe ar spagnoleg (da skouer) da sevel e brogram. Yezhoù bras, yezhoù leun a gultur, yezhoù a sevenadur... peogwir o deus renet war impalaerezhioù e-pad kantvedoù ! Labouret en deus Guzman e-pad pemp bloaz e La Paz evit sevel e brogram anvet gantañ *Atamari*, pezh a dalvez "jubennour" en aymara. Met dav eo bet dezhañ labourat 'pad e amzer vak (piv en dije gopret ur seurt danvez-labour, an *Alliance Française* ?) ha war un urzhiaerezh kozh en doa amprestet digant ur mignon, Hag emañ Guzman o paque lavarout nann d'ur c'hinnig-labour graet gant ur mell stal amerikan, an hini vrasañ war varc'had an ordinarour. Dibabet 'n eus chom en e vro ha stourm evit an aymara ne vez ket kelennet er skolioù hag a vez disprizet gant renerien ar vro. Diskouezet e vez 'vel ur yezh "hep dazont". E-giz ar beizantent indian a ra ganti bemdez, 'michañs ?

Tim Ogouboul

### DIVIZ

- Peseurt ardivink an diaoul a welan aze kluchet, evel ul labous-preizh marnaoniet ?... Ur post-tele / Sapre pemzeg !
- Petra 'ri !
- Allies e chomez da soriñ dirak ar ardivink-se e-giz ur veuzulenn ?
- A bep eil... ar wirionez 'zo kasas d'an neb a zo kablust !
- Fabius ?
- Borodius.
- Anzav a rankas an tele-nour (ger arnevez) (kinnig all : Teleue) e selle muioc'h eget d'e dro ouz ar benveg-vil-se, dreist-holl pa veze Carole Laure war ar skramm, gant he daoulagad kement ha loaioù-dour, he fennad blev evel ur vouarenn. Ya, anvaz a rankas e veze en e seizh piljadur warn-ugent !
- Mut e choman evel un toull-bez pa glevan seurt drochoni !
- Klenk da ribod ha selaoù ! Kalonek e vezan a-wechoù memes tra ! Dec'h em eus sellat ouzh abaden birvidik "Chadenn ar Vro" !
- Ur chadenn, ya sur ! Hualet omp e-giz ar yer e Bear !
- Yer hualet ?
- Re wir !

## AL LIAMM



KELAOUENN LENNEGEL  
BEP DAOU VIZ

koumanant-bloaz ..... 120 lur  
studieren, soudarded, tud dilabour ..... 100 lur

kas ar chekennoù da :

P. Le Bihan  
16 rue des Fours-à-Chaux  
35400 SAINT MALO  
CCP 167 20 W Roszhon



— Edo Freddie Sallé, spikrin lammelek an arvor ; bravigoù a-istribilh ouz he divskouarn oc'h implañ ur bouilh, gwisket-krann, Yann-Ber Duval, buz ha buhez ennañ. E-kerz an abadenn em eus reizhet 40 poelladenn ken nul an eil heg eban ha treset pennoù ar prezantatour hag an inviteoù...

— Da studioù 'teus graet e Skol-Veur Brest pe betra ? Troc'het 'veze ar gaoz da Yann-Ber evit diskouez treset-dennoù hudur Malo Louarn.

Hudur ? Ifern touseg ! Lâret 'teus hudur ? Dindan e blienn hedro e oa diwanet ur plac'h en he ran. — Bravat arvest ! Ar merc'hed ne blijot ket dezho seurt krabisadennoù, morse ne weler paotred noazh !

— E-barzh "Al Lanv" kennebeut !

— Ur gelaouenn bolitikel eo, betek goût !

— The Chieftains 'm eus gwelet ivez, filmet (filmet oam-me) en Orient.

— Ur festival breizhat-rik !

— Goude-se e oa "an taol-lagad", keleier ar vro, petra.

— Atav ken entanet ar Broudig-kozh ?

— Arabat tagañ atav ar re a vez o stourm evit ar brezhoneg !

— ????????

— Anv 'vo eus Mengleuzioù Mael-Karaz evit arvar, buhez an dud dilabour e kêr Vrest.

— Frazelus !

— Brezhoneg "frezh" ha ledan a oa gant an itron Jacq hag hop I distro studio. Yann-Ber pastis...

— Duval.

— Duval a zisplegas pehini oa labour ar vaered brezhoneger. War ar skramm e voe diskouezet splann anvioù kêrioù e brezhoneg : Kawan, Sant Brieg, anvioù-lec'h war beg-douar Plougastell, Kemper (!).

— Perak klemm enta ?

— Dres, "ha Stourm ar Brezhoneg", eme Broudig, "a-du emaoe'h aotrou Duval ?" — "Beu ! labour a-enep d'ar yezh," emezañ, gant ur minc'hoarzh kañfard.

Da grediñ "zo ev eo paeet "Stourm ar Brezhoneg" gant an "Alliance Française" !

— Hag evit echuiñ e voe Diaouled ar Menez o c'hoari tonioù jazz-distrob (fri), Kerno a zistripas ur goñchemn.

— Labour a-feson a ra "Al Liamm" oc'h embann kontadennoù Fathig.

Tudu

### ISTOR BREIZH

Ur wech e oa, ur wech ne oa ket, ur wech e oa bapred... Warlene, e-doug miz Eost, e oan o touristañ sioulik-sioule e bro ar c'hoefoù, ar c'hampouezh hag ar chistr mat... Un deiz, e titourdi Lannuon e paras va selloù war ur gaer a vrudfollenn embannet gant ministrerezh ar Sevenadur ; bevet ar sevenadur ! Ya, tudoù, an douristed o deus ar gwir da vezañ kenteliet bep an amzer, war ar vro ma tispignont enni o gwenneien, ha war an douar ma reont kof rous war-nañ ; koulskoude, ne oan ket engortoz da lenn traoù uhel war, da skouer, politikerezh diabarzh ha diavaez Anna Vreizh, met ne oan ket kennebeut engortoz da lenn traoù folklorel, diwar ha kammzeriek diwar blienn brizhouzi-ziek ur brizhistorour a-berzh-Stad. Ewel just, ne dalv ket ar boan rebech dezhañ bezañ skrivet deomp ar c'haezioù kustum hag ar rac'hoanerezh boutin a ouzomp dija ! ... *les traditions, les coiffes, les costumes font de cette terre chargée d'art et d'histoire une exceptionnelle région touristique...* met pa lennan kement-mañ... *Les Bretons, fiers de leur origine celtic, ont manifesté leur ferveur mystique par la construction du plus prodigieux ensemble mégalithique...* aze 'z eus peadra da souezhañ rak derez-deskamant an istro-gell en deus drokvesket istor ar Vrezhoneg ha sevenadur kozh ar Ragistor hag o doa lakaet peulvanoù Karnag en o sav un toullad ma a gantvedoù a-raok na vefe anv eus Kelted ha Brezhoned ar vro-mañ. Ya, gouzout a ran e vez diskouezet Breizh evel bro ar mojennoù hag al latar, ha neuze, emichañs ez eo bet graet ar fazi istorel-se a-benn-kefridi... Ur faziig dister, a soñjit marteze ? Ma, evit ar C'hallaoued en-mal-d'exotisme eo bet graet an dra-se. Ya da !... ha graet al lu gant istor ha sevenadur Breizh ! Adarre, Lennierien ger, mar plij, kesit ar vrud (hag a zo istorel-rik, ar wech-mañ) n'eus NÉTRA otre sevenadur ar peulvanoù ha hini tud Vreizh. Ar Kelted kozh, int'i, n'o deus savet peulvan ebet, nemet Obelisk, ha c'hoazh ! Bremañ, mar doc'h sur e oa bet savet meing Karnag gant Bretoned soubet e-barzh ur pezh mell kaoteriad a win ruz hud, en ur Vreizh he-fevar-departamant (sellit ouz nemet kourantennoù da liesiv an trakt ofisiel), n'ho peus nemet kourantennoù da "Le Monde de l'Inconnu" pe da "Reflets de la France", ha ne zisoñjoc'h biken ho vakañsioù e Breizh, kentañ tro a vo !

J.L. Dey

## SKRID

DANEVELLOU — BARZHONEGOU  
TROIDIGEZHIOU

skrivet dreist-holl gant tud yaouank  
pe pennadoù nebeut-anavezet  
hor skrivagnerien veur

rener : Gwendal Denez

koumanant evit peder niverenn :  
40,00 lur da Ber Denez  
RI PLOARE 29100 DOUARNENEZ



### N'EUS FORZH PETRA

Anavezout a rit, an darn vrasañ ac'hanoc'h, ar mell imbisil (hag un dagadenn bolitikel e vefe ?!) anvet Chirac. Sandwich etre Barre ha Giscard, ne oar mui re vat petra ober ha lavarout evit sachañ an evezh warnañ. Evit pezh a sell ouzha an ober en deus diskouezet e nulletez pa oa Ministr Kentañ. Setu chom a ra al lavar. Hag aze emañ en e vleud. Etre daou goniret e tistag, buan, ur mell koniri all.

Setu da gentañ e soñj diwar-benn ar merc'hed :

« Pour moi, la femme idéale, c'est la femme coréenne, celle de l'ancien temps, dure à la peine, qui sert les hommes à table, ne s'assied jamais avec eux et ne parle pas. »

Da eil, e soñj diwar-benn dazont bro Frañs :

« Si nous avions eu la fécondité des 80 000 Français abandonnés au Canada au XVI<sup>e</sup> siècle et qui sont aujourd'hui 8 millions, il y aurait actuellement autant de Français que de Chinois. »

Goulen : Ha ma vije bet 27,5 % deus an 60.000 Gall kanadian pichou-kaoch, pet Sinaad vefe o vevan e bannlev Pariz hiziv an deiz ?

(ar respontoù kentañ a resevo un diñuner-kwartz)

Un imbisil all, bremañ, unan tev avat, a gred dezhañ ez eo an den speredekañ war an tamm douar-mañ, un istro-gell a weler war an tele ur wech ar mare, pa vez douaret ur roue bennak, dimezet ur brifsez, pe ampoezonet ur pab. Anavezet peus Léon Zitrone, ar heulke. Ne ouie ket 'michañs pe-seurt sotonni skrivañ (netra nevez e rouantelezhioù ar bed ?) pa zivizas doziñ ur skridig diwar-benn ar sinema. Setu petra lavar diwar-benn ar montaj :

« Le montage donne à un film son allure, sa tessiture, j'ai envie de dire sa frisure. »

Ha kemm zo abaoe 'maon o pauez goulen. N'eus ket. Klemmoù droch a glevet a-enep film Godard "Je vous salue Marie". En Naoned 'z eus bet cheu etre an integristed hag ar bunched ! E Roazhon e oa ar "gatoliked" o kannañ kantikou dirak ar sinema hag o choual sloganoù. Unan anezho a oa : "Cœur de Jésus, sauvez la France". Burzhudus.

Ha bremañ pedomp ! Ya, pedomp, gant "Kevrenn an Ave Maria", evit Bro-Frañs. Lennomp ar bedenn-mañ, pedomp ha votomp Le Pen warc'hoazh.

Pa soñjer eo loustonioù ha diotachou a seurt-se zo bet sanket (a vez c'hoazh ?!) e-barzh pennoù ar paour-kaezh tud a weve en "trevadennoù" ... *hag an holl re all !!!* Gourc'hemennoù a-greiz kalon d'an Iliz Katolik evit bezañ klas-ket dieubiñ ar speredoù. Ha kemm zo abaoe ?

### PRIERE POUR LA FRANCE

(Extrait d'un missel en usage au 19<sup>e</sup> siècle.)

Dieu tout-puissant et éternel, qui avez établi l'empire des Francs pour être sur la terre l'instrument de votre adorabile volonté, le glaive et le rempart de votre sainte Eglise, nous vous en prions, faites faire toujours et partout votre céleste lumière sur les fils supérieurs des Francs, afin qu'ils sachent ce qu'ils doivent faire pour étendre votre royaume en ce monde, et que, pour accomplir cette tâche, leur charité et leur vaillance aillent toujours en s'affermant. Par Jésus-Christ Notre-Seigneur.

Ainsi soit-il.

Nous faisons la croix de la prière pour le pape et pour la France demandée par la Ligue de l'Ave Maria.

† Fr. Card. RICHAUD,

archev. de Paris, Paris, le 24 mars 1965.

Mouezhiadegoù e bro Siria. Adanvet eo bet evit an trede gwech ar jeneral Hafez el Assad da brezidant (evit 7 vloaz). 99,97 % deus an dud enskrivet war al listennoù o deus votet evitañ. N'eus bet nemet 376 den o votin a-enep dezhañ ha 1.457 o votin gwenn. E 1971 en doe Assad bet 99,2 % a votoù ha 99,6 % e 1978. Bewech, avat, ne oa nemetañ war ar renk...

### Leonid Rosko-Pouding

Laouen eo Kuzul ar Brezhoneg o reiñ da c'houzout eo bet anvet e rener, Per Denez, da zDoktor Honoris Causa gant Skol-Veur Gembre. E fin miz Gouere e vo roet an doktor-lezh dezhañ e Kêrdiz.

Kuzul ar Brezhoneg 28 str. an 3 breur ar Goff 22000 SAINT BRIEG

## HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH

Savet e 1954 gant Arzel Even

Rener : Per Denez

ouzhpenn 150 niverenn deuet er-maez  
— niverennoù all e-maez rumad —

koumanant : 60,00 lur (evit peder niverenn); kas ar chekennoù da Y. Desbordes 1 pl. Charles-Péguy Poull-briant 29260 LESNEVEN  
CCP 1499 51 M Roazhon



# SONEREZH



John Fogerty : "Centerfield"

Istor *Credence Clearwater Revival* (strollad rock John ha Tom Fogerty, Stu Cook ha Doug Clifford) n'eo ket hir-hir : 1968-1972. Fetiso'h, avat, eo ar gounid : 150 milion dollar evit seizh albom. Savet e oa an darn vrasañ deus kanaouennoù C.C.R. gant John Fogerty ("royalties" peus lavaret ?), kanaouennoù ne guitaent ket plasoù kentañ an "tcharts" (Green River, Proud Mary, Wrote a Song for Everyone, hag all). Dispartiañ 'ra C.C.R. e 1972, hag embann 'ra John Fogerty div bladenn "solo" a-raok kuitaat al leurenn hag ar studio e 1975. Dek vloaz-pad eo chomet mut. Aet eo, e-pad an dek vloaz-se, bemdez d'e studio personel e El Cerrito (California) da labourat war ar sonerezh (gitar, gitar boud, piano, taboulinou). Ha setu diwanet e bladenn gentañ abaoe dek vloaz, "Centerfield". Kement tra war ar bladenn "zo bet graet gant John Fogerty, nemet ar golo hag ar skignañ !

Sonerezh *Credence Clearwater Revival* oa sichennet war an "Delta blues", al "Louisiana Rock" hag ar "Memphis Rockabilly". Pladenn Fogerty n'emañ ket pell deus ar mes-kaj diaoulek-se. Etre Springsteen ha Dave Edmunds 'mañ staliet Fogerty.

Kregiñ 'ra ar bladenn gant "The Old Man Down the Road"; ur ritm kalet gant ur riff bennak. Gwanoc'h eo an daou damm a glever goude ("Rock and Roll Girls" ha "Big Train from Memphis"). Chom a ray memes tra "Big Train..." vel un doare-gourc'henned doujus da Elvis Presley. Hag ar

re o deus pladennoù kozh C.C.R. a c'hell selaou ur ganaouenn anvet "Who'll stop the Rain" ha keñverañ gant "I Saw It on T.V."; damheñvel eo an daou damm sonerezh-mañ. "Mr Greed", o klozañ tu kentañ ar bladenn, a ziskouez ampartiz Fogerty da sevel skridoù a gлот gant ar sonerezh.

Eil tu ar bladenn ("Searchlight", "Centerfield", "I Can't Help Myself", "Zanz Kant Danz") a zo liesdoare. An tamm diwezhañ "Zanz..." a seblant bezañ un dagadenn personel a-enep Saul Zaentz a rae gwechall war-dro Fantasy Records, merk C.C.R. Kunuñennoù en un aergelc'h reggae. "Searchlight" a gas soñj da "Born on the Bayou", setu e tiverglo envorennoù an hañvezh 1969 pa oac'h o rouzañ gant ho koantenn war an traezh tonm, pe o pokat dezhi en ur voest-noz bennak, pe o... A ! "Born on the Bayou" !! "Centerfield" hag "I Can't Help Myself" a zo dereat. Met diaes eo chom ingal pa glasker ober pep tra e-unan.

Ur bladenn vat eo "Centerfield", blaz *Credence Clearwater Revival* dezhi evel just, ha spi hon eus e adlako Fogerty war hent ar c'hrouiñ.

Guruan

# KOUMANANTIT

# preder

## KRISTENIEZH

Pet gwech am eus klevet klemmoù en abeg da zigasted ar veleien e-keñver ar brezhoneg ? Ha me ivez, pet gwech am eus santet e donder ma c'halon ar gounnar o verviñ pa gleven anezho o lakaat an dud da ganiñ tonioù estren, oc'h ober an digemer karantezusañ da vern peseurt doare deuet a-vaez-vro pa zispriant kement hon hengoun ? Pet gwech am eus bet c'hoant da sevel diwar ma brich evit kuitaat da vat ?... Anken a-wechoù.

Ha nealc'h, ma prederier, ma furcher en hon istor a-c'houde 150 vloaz zo e teuer buan da gompren emeur o c'hortoz ur burzhud ma kreder gellout lakaat an iliz da zigemer ar brezhoneg. Ha ret eo diwall a gaout re a fiziñs er burzhudoù...

Hag-eñ ez eus un iliz e Breizh ? O, 'bez' ez eus "an" iliz du-mañ ivez, an hevelep hini hag hini Varsaille pe Vourdel. Bleniet eo gant eskibien a em dalp gant holl re Vro-C'hall evit dibab "an" hent, ar respontoù graet d'ar bolitikerien... Pep unan anezho en deus e garg en ur "gomision" bennak : *bed al labourizion, unvaniezh ar gristenien, feiz ha politik, ha me oar-me...* Met poan gallet a vefe deoc'h klask traoù evel *feiz ha lid er yezhoù rannvroel*. Mat eo kement-se evit ilizioù an Afrik...

An iliz 'zo e Breizh n'eo ket un iliz na maget, na prederiet gant spered, stad ha dazont hor bro. N'eo nameit iliz Bro-C'hall unvan ha kreizennet e bro ar Vreizhiz ! N'eo ket un iliz "vreizhek", evel ma c'heller lavarout ez eus un iliz "eus-karek" o kemer perzh e kudennoù sevenadurel ha kevredigezhel he bro, o vezañ ezel eus ar vroad, o vezañ ar vroad a-wechoù evel er Pologn.

Belenen Breizh ne ouzont ket, pe ne ouzont ken — pe ne fell ket dezho gouzout — hon eus ivez ur sevenadur, ur yezh, ha tud, kristenien, o roiñ o foan hag o amzer evit kement-se. O studi, o stummadur o deus douget anezho da zispriñ ar brezhoneg, da vezañ prederiet kentoc'h gant kudennoù ar bed a-bezh (an naon, ar brezel...) hag ar pobloù dizoloet dre veajoù ar pab eget gant an darvez tost dezho. An eskibien o deus darempredet skolioù-uhel ar "vamm santel" e Rom. Evel-se, dre greizennadur frammar-dur an iliz harpet gant hini Bro-C'hall emañ bet mouget, moarvat a-raok bezañ bet ganet, ur spered rannvroel, breizhek. Katolik eo, unvan he c'hredenn, unvan he doare da ober.

Ar *Bleun-Brug*, ar c'herlennoù tud yaouank 'zo bet krouet ha kaset gant beleien gredus, Breizhiz penn-kil-ha-troad, d'halet gant o bro hag o yezh. Met frammar-dur an iliz en deus dalc'hat evezhiet a-dost evit derec'hel hec'h "amsav" war an dachenn "folklore!". Gwazh a e evit Perrot ha re all... Fealded ha lealded ar gargidi uhel e-keñver Paris.


Dalc'het 'zo bet da ober gant ar brezhoneg, kalz pe ne-

beut, dre ma oa ezhomm anezhañ evit derec'hel ar vili war tud ar maezioù. Met biskoazh n'eo bet ar brezhoneg evit an iliz, a-c'houde 1850 atav, benveg an arakaat, hini an emgann evit dieubidigezh ar re wasket dre zireizhder ar gevredigezh. Em servijet 'zo bet anezhañ evit labourat a-enep d'ar "menozioù nevez"... Er bloavezhioù tri-ugent, pa eo deuet an aotre (da gentañ) hag an urzh (da c'houde) da lidañ e yezh ar bobl evit tostaat outi hag em "yodernaat", ne oa ket ken da soñjal. Skoulmet e oa ar brezhoneg ouz an doare kozh ha skarzhet eo bet gant al latin...


Aes e oa dre zivarregezh ar bersoned war ar yezh ha pleg ur gevredigezh muioc'h-mui sachet war-du ar galleg, Buanoc'h c'hoazh eo aet an diskar gant sikour ar skipailhoù liderezhel savet e pep lec'h, tolpet a vare da vare a-gevret, ha levezonet gant an negro-spirituals, John Littleton... Arabat ankouaat ivez harp evedus un ardivink a lakaed er mare-se en ilizoù : an uhelgomzer gouest da leunniñ an iliz gant mouezh unan hepken ; perak lakaat ar re all da ganiñ ? Gwir eo emañ bet savet ul liderezh e brezhoneg. Implijet e vez c'hoazh ur wech an amzer da zeiz ar pardon pe da geñver ur gouel bras evit bezañ skignet war ar skinngomz. D'an hafiv o deus evel-se an douristed un tañvad eus "Breizh don..." Tra ebet da dorriñ naon ur Breizhad kristen, c'hoant gantañ da bediñ ha da lidañ e gredenn e yezh e vuhez hag e emgannoù pemdiek.

Chom da c'hortoz un dra bennak digant ar frammm 'zo koll amzer, hufivreal. A-hend-all emañ he levezon o vihanaat a zeiz da zeiz ha ken e vo pell e vo echu gant ar parezioù a anavezomp dre an dioeur a veleien... Ha ma vefe dazont an iliz er strolladoù a weler o kreskiñ bremañ un tammig agostez ? Daoust ha ne vefe ket tu da sevel un "dra" evit Breizhiz zo ? Ne ouzom ket na gant piv na penaos, met ezhomm a zo d'am soñj. Pa ne vefe nameit ur "greizenn" pe ziv er vro a-bezh : buan e vez graet an hent. Ne c'heller ket kredout ne vefe ket ur beleg e Breizh, sammet e spered gant an hevelep soñjoù, ha prest da añsi digor an hent-se. Peotramant e vo ret mat deomp gortoz betek hon digemer gant sant Per : du-se e vo barnet pep unan e yezh e galon, spi am eus atav...

D. Carré



Julian Maner 1606-1683



**BURUTELL-ME-WHAT-YOU-ARE...**

A-du on evit ma vefe burutellet skridoù kenlabourerien "Al Lanv" gant kenlabourerien all. N'on ket a-du, avat, evit ma vefe rebechet traoù (ouzhin dreist-holl !) pa n'int ket reizh. Setu perak on bet souezhet ha dipitet gant pennad Jean-Luc Dey war "Al Lanv" diwezhañ. Souezhet o vezout ne oa ket bet lennet ma fennadoù gantañ. Dipitet en abeg d'an arguzennoù toull en deus kavet.

**D'ouzh lenn ar c'hanneour Gurvan** a skriv J.-L. Dey, emañ an den en arvar da grediñ *n'eus sonour ebet na strolad ebet a dalvoudegezh e bed divent ar sonerezh* (estreget Dylan)... hag all. Piv an den ? Vefen tuet a-walc'h da c'houlenn. Ha skrivet 'm eus *meuleudioù, traoù glorius* diwar-benn Dylan ? Adlennit niv. 25 "Al Lanv" hag e vo tu deoc'h merzout ne oan na meulour :

- Adkroget en deus Dylan da sevel oberennoù a dalvoudegezh... pezh a dalvez en doa paouezet d'hen ober d'ur c'houlz bennak !
- Dav koulskoude anzav ne oa ket gwall vat e bladennoù diwezhañ...
- Aet e oa d'en em goll etre Sant Per ha Sant Paol... Meuleudi ebet. Arabat dikoniñ. Ur revr !

Evit ar pezh a sell ouz ar pennad "Bob Dylan en Naoned" (Al Lanv 27/28 p.32) ez eo dishevel. Savet 'm eus ar pennad-se 'n ur soñjal an mignon Erwan (displeget el liennoù 8 → 15). Implij an anvioù-gwan *dreist, dibar, bamus* a oa un "taol-lagad" rak evel-se eo e komzemp eus kanaouennoù Dylan : un doare da farsal e oa. Ne raamp ken. Pik-echu war ar poent-se, mar plij !!

Sebezet on bet ha talbaget on chomet p'am eus lennet : *d'an hini a gred e vertuzioù ramedel ar sonerezh* pe en *idoloù peurlad ar show-biz*. Pebezh drocherezh ! Ra ouïfe Jean-Luc Dey kement-mañ : ne gredan ket !

Savet 'm eus pennadoù diwar-benn sonerien ha kanerien ne oant ket, pell ac'han, *idoloù ar show-biz* : Big Bill Bronzoy (niv.2), Bessie Smith (niv. 3), Leadbelly (niv. 4), Alexis Korner (niv. 24). Skrivet 'm eus ivez diwar-benn tud anavezotoc'h : sonerien ar reggae (niv. 1), John Lee Hooker (niv. 6), Fats Waller (niv. 12), Gallagher ha Morrison (niv. 27/28), Muddy Waters, Randy Newman, Springsteen (niv. 21/22). Ha krediñ 'rae al lennerien e oan o veuliñ Dylan gant ar pennadoù-se ? Ne gav ket din...

Ur frazenn, avat, on bet dedennet ganti e-barzh pennad Jean-Luc Dey : *ar poinded yaouank a-vremañ, gwisket e du*

*ha kribennek...* rak seblantout 'ra din e tougen ni ur menoz a-vremañ, ur menoz a gaver e-barzh kalz a gelaouennoù "deus ar c'hiz", menoz al LOOK. A ! al look ! Ul look cool, ul look haba, ul look plouk, ul look cold, ul look mersimeus-ket-ehomm, ul look re-nebeut, ul look mouk, ul look petra c'hoazh ? Ul look a-netra, ul look bramm, ul look funk, ul look... Troc'hañ e vlep pe livañ anezho ruz-melen ha glas, ispihennañ ouzh e chupenn ur badj "Piss off" e plas ar badj "Peace & Love" (a veze douget gwechall gant lod), teurel kuit e votoù-koad evit kerzhout gant "hiking-boots" ar Skins, komz galleg evel Gillot-Pété (jeux - dire - complètement - effectivement - yfrabodmain - pas-du-tout), sellout ouzh Dallas ha kavout brav, votiñ Ockrent, brallañ e ibil dirak ur meleour 'n ur selaou ouzh Téléphone, setu ul look. Ne vem din. Pezh a gavan droch eo kemer ul look bennak evit bezañ DEUS AR C'HIZ ha dre-se karout "The Cure", "Echo and the Bunnymen", "Hanoi Rock" hag al peogwir ez a gant al look dibabet.

Dav diwall : AL LOOK A GAS ANDROUG.

Gurvan

**Beaj Toñton e Roazon, Iañ a viz C'hwevrer 1985.** Merzet en deus Toñton ne oa ket bet graet trawalc'h evit ar brezhoneg an tri blez paseet-mañ. Anzavet en deus ! Goulennet en deus krouidigezh ur C'h.A.P.E.S. Setu ar pezh a embanne "Ouest-France" an deiz war-lerc'h :

Langue bretonne : - On n'a pas assez fait depuis trois ans, si je dit au conseil régional, je demande la création d'un CAPES de langue bretonne moderne.

Siwazh e oa ret kompren : "Un CAPES de langue bretonne et de lettres modernes." Laret ho peus "bizar", ma c'henderv ?

**Peuziat** : war F.R.3, d'ar Sul, a gomze ag ar prezidant "Mitterrand". Du-mañ e vez lakaet ar vugaligoù da jiboaset mitterrand, e toull ur park, ur vazh gete en o dorn. Biskoazh n'on deus den tapet heni ! Adal bremañ e vint kaset da Bariz, d'en em lakaet en aspi, doc'h toull dour an "Elysée".

**Yann-Ber Duval**, war ar seblant, a zo chomet da daboulinañ, a-dreñv, get ar fanfar. Komz a rae eñv, (d'ar Sul, war F.R.3) bepred), ag al "lisañs" a oa evitañ un "araokadenn vras". Hama, ma eontr, poent eo dihuiniñ.

**Kenwerzhourien vihan ar C.D.C.A.** o deus manifestet d'al Lun 28 a viz Genver e Kemper, bonedoù ruz gete war o fenn, ur gokardenn triliv war pep boned ! Ar re-mañ n'eo ket sklaer o jeu tamm ebet !

Daniel an Doujet

**LOEIZ ANDOUARD : JAKEZ KARTER**

Deuet eo an istor da vezañ diouzh ar c'hiz. Kalzik a levrioù a vez embannet ; un embanner bannoù-treset brudet a-walc'h a zo o vont da ginnig ur gelaouenn istorel d'e lennerien. N'eo ket souezhus enta gwelet ul levr istor e brezhoneg o tont er-maez.

Ul levr dister eo hini Loeiz Andouard e-kenver ar meloù tezennoù a bleustr war ar poent-man-poent eus hon amzer dremenet, pe e-kenver al levrioù tev a zezzevell doemp istor Breizh en he fezh. Talvoudusoc'h eo bet koulskoude evidon eget ar re-mañ : e lennet em eus.

Ma fell deoc'h gouzout petra a soñjal eus an oberenn, ha tra ken, it, hep dale, d'al lodenn anvet *Penaos ne zeuas ket Jakez Kartar da vezañ un den meur*. Plijout a ra al levr din, dre vras, abalamour da berselezh ar merdeat, abalamour d'an amzer ma veve an den emni, ha dre 'm'eo skrivet e brezhoneg. M'hoñ eus Choant hag amzer da brederiañ war dazont hor bro, neuze e c'hellit lenn ar pezh a grog amañ din.

**Ul levr skrivet e brezhoneg**

Ne baot ket al levrioù istor skrivet e brezhoneg. Pennadoù a gaver amañ hag ahont, war niverennoù kozh hor c'helaouennoù. Keit ha ma ne vezint ket dastumet e levrioù, avat, e vezint kollet evit an darn vrasañ ac'hanomp. Talvoudus eo enta *Jakez Kartar* war daou boent : savet eo bet e brezhoneg hag embannet eo e stumm ul levr.

Gantañ ivez ez eo bet startet va feiz e gallow hor yezh da zieren spereid ur Breizhad. Setu penaos, evel kalz kenvidioù em boa prenet, kerent ha ma oant deuet er-maez, al levrioù istor savet gant Skol Vreizh. Gouzout a rae ervat e oant binviñ prizius ; desket em bije traoù e-leiz ma'm bije lennet anezho<sup>1</sup>. Manet e oant koulskoude war estell va levr-oueg, ha diskenn a rae goustad ar bouldrenn war o gorre. Chom a rae, a-wechoù, da sellet ouz ar bouldrenn alaouret o tiskenn hag o sevel e bannoù an heol. Prenet em eus neuze oberenn Loeiz Andouard, ha lennet em eus anezhi. Kerent hag echu ar



Liatri breizhat er Gremmazer. (tresadenn gant X. Haas)

bajenn ziwec'h e savis hag e lamis etrezek al levrenn *Istor Breizh* gouestlet d'ar XVIvet kantved. Lenn a ris, gant akeid, ar pennadoù diwar-benn ar c'henwerzh dre vor. Koanto'c'h em eus kavet al levr zoken, hag en ken sirius hag ur mestr-skol a-wechall e envor e skoliadi.

Miliadoù a Vretoned o deus desket galleg abaoe kant vloaz, ne gredan ket e vije ur Gall en dije desket brezhoneg. Unan bennak en deus graet, marteze, evel Meven Mordiern ; he-mañ, avat, a zo deut da labourat en Emsav. N'eus e Pariz brezhoneger ebet ha ne vije ket breizhad. Ha stourm a ray evit e vro, pe evit lodenn getiek ar sevenadur gall. E-touez ar C'hallaoued a deurevz sellout ouz an troidigezhioù ez eus,

siwazh, kalz Bretoned. Daoust ha ne c'hellfent ket deskin brezhoneg ?

Gouzout a ran, ha c'hwi koulz ha me, pegen tenn eo ar brezhoneg da zeskiñ : c'hwi oar pet a nozvezhioù hag a eurvezhioù a rank unan koll evit plegañ e spereid d'ar fonetik, d'ar geriadur ha d'ar yezhadur. Spereid an darn vrasañ n'eo ket lenn ouzhpenn, hogen poummer. Ha n'eo ket diwir zoken padal, gwell eo d'un emsaver tevel dek vloaz-pad, amzer kregiñ gant ar yezh, eget chom e-pad dek vloaz o prezeg a-zivout ur vro a anavez dre lavar ar re all.

Gwell eo atav koll amzer p'emeur p tiazazañ un dra bennak. Ar re ac'hanoc'h a anavez buhez ar skolioù a our

penaos e vez mastaret studioù bugale ar vicherourien hag al labourerion-douar dre ma ya re vuan an traoù. Goustadoc'h e ya ar skolidi-se eget ar re all. Anavezet eo dale n'eo ket hepen gant ar gelennerien ruz, hogen gant an holl. Bez' ez eus er skolioù, ret hen an zav, tud a youl vat, ha diouer a argant.

Bugale ar vour'hizien, pe an darn vrasañ anezho, a ya fonnaploc'h war-raok. Klotañ a ra gwelloc'h doare ar skol gant o zro-spered, evel ma klot ar galleg gant tro-spered ar C'hallaoued. N'eo ket ganto e vo degaset kemm er skolioù : kavet e vo sur a-walc'h kelennerien galonek en o zouez hag a vo prederiet gant kudennoù o skolidi daleet. Ar re-mañ, ma c'hellont mont betek penn o studioù, o devoa c'hoant degas kemm ; met rouez-meurbet int, ker rouez hag ar merrched e bed ar bolomigou-paper.

Stankoc'h eo bugale desket ar bobl en Emsav, ha nevezentioù a zo bet degaset ganto alies ; n'eus ken soñjal e tud evel Youenn Drezen, Jakez Riou, Morvan Lebesque.

N'eo ket souezhus e vefe liammet an div gudenn : hini ar yezh, hag hini bugale ar werin. Mar deo ret kas ar brezhoneg er skolioù ez eo, da gentañ, evit bugale al labourerion-douar hag ar vicherourien. Evit ar wech kentañ e vo degemeret eno benveg speredek ur bobl. Gant ar yezh e c'hellont mont pelloc'h eget ar skolioù-dorn. Neuze ivez e c'hellont ar gelennerien ober estreget kalonekaat ar skolidi "wan" pe kanañ meleudi d'al labour-dorn.

Gant ar galleg e tizher an holl, evel ma ra an deskadurezh-stad. Kalz argant a c'heller gounit ivez o komz e galleg eus sevenadur dibar hor bro. Hogen ma kredet e talvez ar sevenadur da ziorren spered un den, da ober anezhañ broad ur vro zemekretel, neuze e c'heller koll amzer ha deskñ brezhoneg. E-mod-all ez eo a-walc'h degas micherourien eus ar broioù paour, rak ar re-mañ ne vez ket kollet argant gant o deskadurezh.

Ra zigarezo lennerien *Al Lanv* va c'homzoù kar-ar-werin, a vije bet brav o c'hlevout dek vloaz zo. C'hwec'h an nevez-amzer a zo, siwazh, gant deizioù kentañ miz C'hwevrer : hag ar merrched a gav dezho ez eo kaer ar baotred. Goude ar mizioù du, goude ar

skorn hag ar riv, e teu ar vuhez adarre, n'eo ket souezhus e vefe fromet an dispac'her. Hogen bezit dinec'h, ne ran nemet mont war-lerc'h, ur bloaz zo dija ez eo bet savet un tu kleiz nevez e Pariz, hag ar strollad-mañ a vefe bev-mat en Naoned. **Kevredad evit un Tu Kleiz Dazelat** eo e anv, ennañ tud eus ar P.S.U., A.M.R., tud C'hlas. Tu vo, moarvat, da brezeg diwar o fenn ur wech all.

Dihentet on bet, poent eo adkavout Jakez Karter.

**Ul lev'r hor c'has en tu all d'an Dispac'h Bras.**

Ar C'hallaoued he deus an istor kalz pouez war o freder. Atav e klaskont en o amzer dremenet peragoù ha penaozioù o c'hudennoù arnevez. Setu, d'an nebeutañ, pezh a embann an dud poellek o deus studiet o zenn-spered? Ugent vloaz zo e pigne Glenmor war al leurenn, un tammig diwezhatoc'h e voe tro Alan Stivell. Dav e voe dezho kregiñ gant leurennoù Pariz : e-mod-all ne vije ket bet selaouet outo e Breizh. Heñvel e c'hoarvez gant hon istor : ar

Vrezhoneg a sell atav ouzh o amzer dremenet gant daoulagad ar C'hallaoued. Hag evit ar re-mañ ez eo Breizh ur vro eus an XIXvet kantved?

Petra oa hor bro, neuze, kant vloaz zo? Betek an naontekvet kantved e oa bet kompez a-walc'h hon douaroù : o anv kentañ, hag a zo chomet e kembraeg dindan ar stumm *Llydaw*, a dalvez kement ha "bro blaen". An heol melen a baras war hor maezioù betek an Dispac'h Bras. Neuze e lakaas ar skrivagnerien romantel menezioù gouez da sevel betek ar c'hoarveziz ha du. Ernest Renan a skrive zoken, e raskrid al levrig en deus gouestlet da *ene* e vro, e oa Breizh re bar d'ur *c'hreñv lec'h*. Studiet mat eo bet ar mared, gouzout a reomp, hiziv, perak e oa bet savet ar *c'hreñvlec'h*-se gant hor c'henvroidi a hendadoù : fellout a rae dezho herzel ouzh menozioù ar Stad nevez. Gouzout a ouzomp ivez e oa bet savet gant dafar gall. Er c'has-tell-se, avat, e kavomp kement tra a ya d'ober hor *sevenadur* : ar gwiskamantoù kaer, ar choutanted, ar veleien, ar besketarier kostez ar mor, ar boued, ar c'hleuzioù, ha zoken ar chapelioù hag ar yezh.



**LEVRIOU**

Ne gomzer, abaoe ur pennad, nemet deus lev'r an itron Signoret. Gwelet e vez an Itron war ar skrammig, klevet e vez er radio, ha goulnataet 'vez gant kement kazetennet parizian n'eus netra da gontañ. Ma, sur eo e kavo gwerzh d'hec'h oberenn gant ur seurt bruderezh. Ne gomzin ket, er rentañ-kont-mañ deus lev'r Signoret pe deus hini Duras, ne lårin grik diwar-benn lev'r Robbe-Grillet pe c'hoazh hini Sollers. 'N em c'houlenn 'ran koulskoude pegoulz an diaoul e skrivio an Itron-Mère-Denis hec'h eñvorennoù. Evit uhelaat live an intelligentsia e Pariz...

**AN HERE**

Kas a rin da gentañ gourc'hemennoù d'hor c'henlabourer Martial Menard ha da skipañ *An Here* evit al labour talvoudus, efedus, poellek hag arzal a vez graet ganto. Poent bras oa nevesaat an embannadurioù levrioù-bugale. Dav e oa reiñ d'ar re vihan danvez brav, e liv, dudius ha fentus war un dro. Ur meneg ispisial a roin d'al lev'r "Choupiq Morzhadeg" savet gant ur Breizhad (Daniel Kerjean). Bez' e c'heller, gant lorc'h, keñveriañ "Choupiq" gant al levrioù bravañ a vez embannet e yezhoù all. Enor 'ra "Choupiq Morzhadeg" d'ar brezhoneg.



SAM SHEPARD "Motel Chronicles"

Brudet eo Sam Shepard (ganet Steve Rogers e Fort Sheridan, Illinois, e 1943) er Stadoù-Unanet evit e bezhoù-c'hoari dreist-holl. Ouzhpenn 40 'n eus skrivet ha gounezet 'n eus ar priz Pulitzer evit unan anezho, "Buried Child". Anavezetoc'h eo en Europa evit e labour "skriver-filmoù" (gantañ eo bet savet senario "Zabriskie Point" Antonioni ha "Paris, Texas" Wim Wenders) hag arzour sinema (c'hoarriet 'n eus e-barzh "Days of Heaven" ha "Frances", da skouer. Met gant film Dylan "Renaldo and Clara" eo bet

gwelet 'vit ar wech kentañ war ar skramm).

Brudet eo ivez Shepard evit bezañ bet tabouliner ar strollad acid-rock "The Holy Modal Rounders" a glevet "Bird Song", ur ganaouenn savet ganto, er film "Easy Rider".

"Motel Chronicles" a zo unan deus e nebeut levrioù komz-plañ ha barzhoniezh. Skridoù berr, vel fotoioù deus buhez un den o kantren er Stadoù-Unanet. Romantelezh ebet, ur skritur pizh ha spis, un oberenn leun a velkoni. Tremen 'ra an amzer a-dizh.

Setu amañ ur skouer :

*daoulinet da zaoulin o toullañ an noz gwir eo ar stagadenn don-se gwali wir eo*

*diaezhennañ 'ra an douar ur c'hemenn a bakan gant ma anal*

*puðasked konikled marv tommdar an deiz o tiloc'hañ*

*'lec'h bennak 'barzh un tren emaoût da welout 'ran o sellout dre ar prenestr 'lec'h bennak kostez Salt-Lake City*

*amañ emaoñ-me speget ouzh ar prenestr*

**ORKIDEENN EBET EVIT J.H. CHASE**

Exit, James Hadley Chase. D'ar 6 a viz C'hwevrer eo marv (oadet 78) en e wele, eñ en doa lakaet kement a dud da vervel gant doareoù spontus. Setu anezhañ aet sioulik da adkavout Miss Blandish.

Tost da gant lev'-polis en doa skrivet dindan tri anv : Raymond Marshall, Ambrose Grant hag an hini brudetañ James Hadley Chase. Rene Raymond oa e anv gwir ha ganet oa e London e miz Kerzu 1906.

Diskouez a ra en e levrioù ur bed breinet gant galoud an arc'hant hag ar reizh, ur bed treuzet gant munterien dibogell ha drouk. Lec'hiet er Stadoù-Unanet, ur vro n'eo bet enni nemet div pe deir gwech, e istorioù ne oa enno "ha denjentil na tabou" 'giz ma lavare Orwell. Gant "Orkideenn ebet 'vit Miss Blandish", embannet e 1938, eo e c'hounezas e vrud etrevroadel. Istor ur skrapadeg eo, gant ur stourm didruze etre daou strollad gangsterien (Riley ha Grison), gant lazhadegoù e-leizh. Koulskoude e lak Slim Grison, ur muntrer foll, da soñjal e Lenny "Of Mice and Men" Steinbeck pe c'hoazh Popeye "Sanctuary" Faulkner. Gant an div dudenn (Slim Grison hag e vamm Ma Grison) e tizh Chase live uhelañ ar romant-polis. Tri film 'zo bet savet diwar "...Miss Blandish" : daou film amerikan, hini John Clowes e 1948 hag hini Robert Aldrich e 1971 (n'am eus gwelet nag an eil nag egile). An trede film, savet diwar an heuliadenn "Kig an Orkideenn" a zo bet savet gant Patrice Chereau (gant Signoret, Cremer, Rampling), n'eo na mat

Daoust d'hon ilizoù bezañ bet savet daou-c'hant vloaz a-raok, e vezont karet evit abegoù romantel. Daoust d'ar yezh ivez bezañ komzet abaoe ur pennad amzer, ha skrivet memes, hor brezhoneg a van c'hoazh hini ar Gonideg ; kalz vad e rafe, d'am soñj, enebñ ouzh ar gredenn-se, un embannadur marc'had-mat eus ar *Châtillon*.

Staget omp ouzh an naontekvet kantved, ha dre-se ouzh ar sevenadur folklorel, gant abegoù all. Tud hon eus o deus bevet war wirmenn ar c'hantved-hont. Ar brederouren ivez hag o deus stummet hor speredoù a vevas en amzer-se. N'eus ken soñjal e tud evel Hegel, Marx, Nietzsche, Freud, Sokiatour omp, hag ar sokiatourerzh a zo kenad gant ar studioù folklorel.

Ha padal ezomp war-raok, o pellat diouzh amzeri Gerwarker. Meur a rumad emsaverien en deus pleustret abaoe. Seul vui ma teuz levezon an XIXvet kantved, seul vui e teu ar vro da vezañ heñvel ouzh ar pezh e oa a-raok an Dispac'h Bras. Pa oa ar Vrezhoned re bar da bobloù all Europa. Eus ar c'hantved romantel ne chom nemet ar greun. Ar vro gompetez a vo, moarvat, hini hor re yaouank ; evito

e rankomp ijinañ ur Breizh nevez. Skiant a zo da breññ, enta, er c'hantvedoù tremenet, ha n'eus nemet an tamm XXvet kantved omp deut a-benn da sevel a c'hello hor c'has du-hont. N'eus ket da souezhañ neuze e vije bet savet al levri diwar-benn Jakez Karter gant un den en deus anavezet mat amzer *Walarin*.

N'eo ket karet sevenadur hor bro gant ar skingomzerien a zo o chom enni<sup>4</sup>. War ar chadennoù parizian e vez tu alies da glevet pennadoù diwar-benn Breizh, e galleg evel just, hag evit ar C'hallaoued. E-pad ur sizhunvezh hon eus gallet selaou ouzh ur rumad abadennoù skignet diouzh Ti ar Sevenadur e Roazon. Ar rener anezhañ en deus lavaret n'en doa ket kavet e Breizh un aergelc'h a lakafe anezhañ da grouñ, hogen plijout a rae ar vro dezhañ kenañ-kenañ. Unan all a fougase e oa deut Roazon, ha Breizh peogwir ez eo ar gêr-mañ he c'hêrbenn<sup>5</sup>, da vezañ ur greizenn rock bevubezek, bliv-bividik zoken. Gwir eo moarvat, met gouzout a ouzomp-ni, emsaverion wirion, n'eus emsav ebet e Breizh pa n'eo ket ganet war un dro er c'hêrioù, war ar maez, er menezioù, ha kostez an aod, rak tud a zo e pep lec'h.

Chadennoù ne vezont nemet an tamm da zegemer kreizdennoù nukleel ar c'huzul jeneral da gas tredan d'ar gitarioù pell.

Peur e vo gwelset neuze skouenn resis ur strollad rock e dour du hor feunteunioù ? Peur e savo er vro sonerien ken divalav hag hor sent kozh, pe ken enkreuz hag ar sentezed Berneza o deus kemeret o lec'h ? Tro 'vo da gavout un dachenn emglev moarvat : kar eo an dud a gan ar c'hêrioù kalet d'ar re a reas dantelezh gant maenn-greun<sup>6</sup>.

**Penaos ne zeus ket Jakez Karter da vezañ un den meur.**

Gouestlet eo al levri d'ur maread ne zarempredomp ket nemeur, hag anez gouizgezh Loeiz Andouard en em gav'emp kollet un tammig e penn kentañ ar XVIvet kantved. Stank eo, aval, danvez al levrig ; war zigarez dezrevell buhez un den e kinnig an aozer un daolenn eus merdeadurezh etrevroadel an Adc'hinivelezh hag eus buhez politikel an amzer-hont.

Kontet eo bet deomp meur a wech gant hon istorourien e o niverus da neuze bigi Breizh en holl borzhioù Europa. Padal, n'eus ket peadra da sevel huiñveoù broadelour dispar, huiñveadennoù kenwerzhel ne lavaran ket. Hol listri, enta, a oa traoù bihan, ha ma oa hon tadoù-kozh perc'henn warno, war ar marc'hadourezhioù ne oant ket. Feurrañ a raed bigi hor bro, ha pa n'eus ket bet ezhomm anezho

ken, ez eo kouezhet hor merdeadurezh en he foull.

Tennañ a ra a-walc'h istor ar verdeadurezh-se da hini ar sardinetaerezh e penn-kentañ hor c'hantved. Gwechall evel dec'h ne c'hounezze ket hor morerien ouzhpenn ar pezh a oa ret da vezañ. Ne felle ket dezho, enta, mont e penn an aferioù d'o mestroniñ. Pleg ar ouenn eo, hervez Loeiz Andouard : "Ar Vretoned, a-hend-all," emezañ, "a vez berr a-walc'h o c'hoantegezhioù. N'o devez ket ar c'hoant peurliesañ da sevel uhel er gevredigezh. A-walc'h ganto alies tapout ur stad-a-vuhez hag a ro tu dezho da vezañ dibredet hag en o aez." (p.32). Seurt lavarenn a ranker he c'hompren mat. Ha gouzout a rit an tu, lennerien ger ? Ma ouezit, neuze skrivit ho soñj da *Al Lann*. Moulet e vo ar respont a vo kavet ar funañ, ha goumit a ray an danvez prederour ur prof bennak.

Digarezit ac'hanon da vezañ mesket farsadenn ha poelladenn, ha distroomp da gostez ar mor. Tenn eo gouzout hag heñvel e oa Jakez Karter ouzh ar Vretoned meneget a-us. Goulakaet eo bet gant Loeiz Andouard diwar an arroudennoù rouez o deus talvezet da sevel

ar poltred. Rouez int rak, a-raok ar XVIIvet kantved, ha dreist-holl a-hed ar Grenn-Amzer, ne veze ket taolet evezh ouzh personelezh an dud. Jean-Jacques Rousseau an hini eo, en deus diskouezet e c'helle an darvoudoù dister lian un den. Paouezomp bremañ gant lennegezh ar C'hallaoued ha gwelomp pezh a anavezomp eus buhez hor merdead. Den ebet, en e amzer, n'en deus dezrevellet e vuhez ; ne chom anezhañ enta, estreget ur sin bennak, nemet an danevelloù an deus skrivet eus e deir beaj, ha diglok eo an hini diwezhañ. Savet eo bet neuze skouenn Garter diwar pezh a anavezomp eus lomannet ar XVIvet kantved, ha goulakaet a reer e oan un ampart dre m'eo bet dibabet evit ergerzhadenn an douar neuze.

Diseñvel eo koulskoude hol lomannet diouzh merdeidi veur evel Kristoforo Kolombo pe Vasco de Gama. Skoazallet-mat e oa ar re-mañ, ha pell int aet. Vasco de Gama, goude un hir a veaj, en deus tizhet bro Indez ; porzhioù pinvidik en deus kavet : "An holl spisoù ha louzoù c'hwezhevatek ken c'hoantat gant Europiz a oa eno, a-vil-vern kouz lavarout" (p.19). Ne



voe ket ken evurus hor Malsouad ; setu, da skouer, pezh a skrivas diwar-benn ar vroidi a gavas : "Ar re-mañ," emezañ, "a c'hell bezañ anvet tud paouroc'h egeto er bed" (p.83).



IRISH IBERIAN. ANGLO-TEUTONIC. NEGRO.

na fall. Brudet met kuzhet en e balez a vro Suis, bez' e vo Chase ur marc'h-labour evit Gallimard. An hevelep istor eo atav, evel just, met petra vern ? Kouz eo lenn ur romant-polis gant J.H. Chase eget "France-Soir". Kement a vad hag a reor 'zo e-barzh an eil hag egile, met levrioù Chase ne flaeiriont ket...

**DRESSED TO KILL**  
Cartoonists and the Northern-Ireland Conflict. John Darby

Setu ul levri a ra kalz a vad ! Studiañ 'ra John Darby an doare m'eo bet diskouezet Iwerzhoniz gant an dresourien. Perak e veze, da skouer, treset an Iwerzhoniz 'vel un "hanter-zen, hanter-varmour" e deroù ar c'hantved ? Peo-



Harper's Weekly

gwir ez eo ar bobl Iwerzhonat a orin... afrikan !! Abaoe daou-vil-bell'zo, met a orin afrikan... Deroù al levri ("An den gouez") a ziskouez drammoù marmouzien gant farsadennoù droc'h evit goapaat Iwerzhoniz. Met gouestlet eo lodenn vrasañ al levri d'ar brezel dieubidigezh 'zo o ren buhez an Ulster abaoe ur prantad brav.

Ha neuze, ar varmourien ne lakaont ket mui da c'hoarzhin. Lazhañ 'reont ar soudarded saoz gant bolodoù gwirion ! Muntrerien didruez e teu ar varmourien da vezañ...

Ma peus tro da breññ al levri, arabat termal. (Embannet eo gant Appletree Press). E-leizh a dresadennoù 'zo ennañ hag ur studiadenn dibar gant John Darby.



**LIAM O'FLAHERTY**

D'an 11 a viz Gwengolo 1984 ez eus bet douaret e Dulenn unan eus skrivagnerien arouezusañ Iwerzhon : Liam O'Flaherty. Ganet e oa bet e 1896, war enez Inverara (Aran). Un toullad brav a enebourien en deus bet a-hed e hir a vuhez. An doare rok a gemere gant an dud, ar c'hunujennoù a stlape ouzh fri e vignoned hag e enebourien, e zispriiz evit Iwerzhon ur mare 'zo bet, ne lakae ket da soñjal e oa bet ganet en Aran. "The wild man" (an den gouez) oa bet lesanvet.

Kloareg e voe, evel un darn vras eus paoered yaouank paour Iwerzhon, met kuitaat ar c'hloerdi a reas hag en e galon e chomas kasoni evit an Iliz. *Kasaat 'raen ar veleien (...)* *Dañsal 'ris war ma sountanenn, tufañ 'ris war ma levrioù relijiel ha kuitaat ar vouge-se leun a sottoni hag a vrizhkredemmoù droc'h.* (Shame the Devil - 1934)

Mont a reas a-du gant ar vroadelourien a-raok kuitaat anezho evit kemer perzh, e-barzh ur rejimant iwerzhonat deus an arme saoz, er Brezel Bed kentañ. Displegañ 'ra e vuhez war an talbenn el levri "The Return of the Brute" (1929). Gloazet-bras e 1917, pareet hervez ar vedisined, chom a ray klañv e spered betek fin e vuhez.



Kalz hent o devoa troc'het ivez Kristoforo Kolombo ha Vasco de Gama war morioù ar bed. Tizhet o devoa abenn ar fin broioù hag inizi tomm, leun a frouezh chugonus. Jakez Karter n'en deus graet nemet mont un tammig pelloc'h eget ar besketerien a zamprede an Douar Nevez. Ne ve ket zoken an hini kentañ o tegas Indiant en Europa : gwelet e oant bet dija e penn kentañ ar c'hantved. Goude bezañ renet e verdeadenn war dourioù yen e kavas ur vro glozet gant an erc'h an hanter eus ar bloaz, dres el lec'h m'eo an tevañ er bed.

Devezhoù kaer en deus bevet duhont moarvat, dindan un oabl glas ha glan. Sellit en deus ouzh ar mor o tec'hout e skeud e vag. Selouet en deus ouzh strak ar c'hoad, ouzh storlok ar gouelioù koeñvet gant an avel sin. Arvestet en deus ivez ouzh labour ar vroad, ha komzet en deus gant — pe distaget en deus ur poz bennak, rak an dud a vor, hervez, a vez tavedek pa vezont o verdeñt. Tu a vije bet dezhañ, enta, sevel un danevell dedennus, evel m'en devoa graet Kolombo ; siwazh, ne oa ket douget ar Malaouad d'al lennegezh.

Ne vo ket gwalc'het hor c'hoant tud

veur gant Jakez Karter ; n'eo ket al loman a zo kiriek koulskoude : ar brientin en doa e gaset en tu all d'ar mor ne oa ket gwall chalet gant ar verdeadurezh. En tu all eus e rouantelezh edo e breder, e broioù Italia, m'edo e vrezeliñ. Ne oa bet diazezh tra en e raok gant Duked Vreizh. Dre zegouezh kentoc'h eget dre ur youl start eo en doa bleuniet hor porzhioù niverus. Aozet e voe ergerzhadenn ar C'hnanad evit ober evel ar broioù all, hogen Jakez Karter ne voe nemet ur stultenn, evel m'eo bet, en hon amzer-ni, Ministrerezh ar Mor.

Dishenvel-mat e voe d'ar mare-se em-zalc'h Portugaliz : "As-raok mont pelloc'h," a skriv Loeiz Andouard, "eo levet menegiñ al labour aketus ha talvoudus-bras a reas trede mab roue ar Portugal a savas e Sages, war aod kreisteiz ar vro, ur skol verdeadurezh vrudet. Bodañ a reas enni kabitened-vor, save-rien gartennoù ha gouzieren a bep seurt da studiañ penaos kas war-raok hon anaoudegezh eus an Douar" (p. 18). Ne vez ket didalvez atav ar skolioù enta.

### Evit klozañ

Ur c'hen hir a bennad a lakaio, mar-teze, unan bennak da brenañ levr Loeiz Andouard. Karout a rafen, evit klozañ, 'tennañ evezh al lenner-mañ war stumm diazezh al levr.

Gwelet e vo da gentañ ez eo bet renket pep tra en-dro d'un den, hag un doare mat eo da vuhezkaat an istor : pep hini ac'hanomp a zo un den, d'an nebeutañ, ha n'eus nemet unan bennak a zo neved, istorour, marc'hadour pe politikour.

Da vezañ ivez : Loeiz Andouard a anavez mat-tre danvez e levr. Morse ne chom berr, koñfortus eo evit al lenner. Barn a ra an arroudennoù gant aked ; hag aketus a-walc'h eo ivez da ginnig pep tra e brezhoneg.

Niverus eo an dielloù hag ar skeudenoù el levr, n'ouzon ket piv a zo da vezañ gourc'hemennet.

Ul levr kinniget kaer eo *Jakez Karter*, evel an holl re a vez lakaet da zont er-maez gant Mouladurioù Hor Yezh. Gourc'hemennoù, enta, da Jakez De-rouet en deus savet ar golo, d'an ti Cloitre en deus moulet al levr, ha d'an embaner en deus renet pep tra.

Ur glazadenk a rank toullañ hentoù

### DEVEZH BRAS EN ENOR DA JARL PRIEL d'ar Sadorn 12 a viz Mae 1985

D'an 23 a viz Ebrel 1885 e voe ganet e Priel, e-kichen Landreger, Charles Jozeph Mari Tremel a oa da vont da vezañ brudet diwezha- toec'h dindan e anv-pluenn *Jarl Priel*. Doust ma voe ar brezhoneg yezh e gavel ha yezh e diegezh e rankas deskiñ galleg er skol. Hen deskiñ a reas ken mat ma teuas da vezañ kelenner war ar galleg e Borovitchi, e bro Rusia, eus 1911 da 1914, da lavarout eo nebut amzer a-raok an Dispac'h. Kontet en deus e vuhez du-hont en eil levrenn e efiorennou : "Va Buhez e Rusia" embanet evit ar wech kentañ e 1965.

Galvet e voe d'an arme gall e 1914 ha goude dibenn ar brezel ez eas da labourat da Paris ha dont a reas da vezañ un aktor brudet a-walc'h er ger-benn c'hali. Mignon e voe gant tud hollvrudet en amzer-se evel Louis Jouvet ha Charles Dullin. Ur skrivagner gallek brudet a-walc'h e voe ivez gant meur a romant hag ivez danevelloù e kelec'h- lazzennoù kinniget gani.

Souezhus a-walc'h eo soñjal ne zistroas da yezh e gavel nemet pa oa dija ouzhpenn 50 vloaz, da lavarout eo d'an oad ma n'o deus mu kalz skrivagnerien kalz tra da lavarout ken. Er c'hontrol ez adkasas Jarl Priel neuze ul lañs hag un aven nevez ha sevel a reas etre 1940 ha 1965, bloaziad e varv, un oberenn vrezhonek a-bouez bras e gwirionez : 17 pezh-c'hoari, e efiorennou e teir levrenn, kontaden- noù, ur romant kaer ("an Teirgwern Pembroke") ha danevelloù troet diwar ar rusianeg...

Ne labours ket hepken gant e bliun met c'hoari a reas e-unan e meur a bezh-c'hoari savet gantañ. C'hoari a reas ivez roll Saluañ ar Foll e film brudet ar vrezider Caouissin "Mister ar Folgoad". Mervel a reas Jarl Priel e 1965.

Da geñver e gantvez dezhañ-bloaz he deus *Kevredigezh ar Skrivagnerien* (ha c'hadoriad, Ronan Huon) divizet aozañ un devezh bras en enor da Jarl Priel d'ar Sul 12 a viz Mae 1985 e Priel hag e Landreger. Dizoloet e vo ur blakenn-eflor en e anv e Priel diouzh ar beure ha goude-se e vo ur friko bras gant ar skrivagnerien vrezhonek hag o mignoned, prezegennoù, kanaouennoù, mar-teze un abadenk c'hoari hag ivez bannidigezh ar film "Mister ar Folgoad". Hep dale e vo embanet programm klok an devezh...

Kevredigezh ar Skrivagnerien, Kuzul ar Brezhoneg 28 str. an 3 breur  
e Goff 22000 SANT BRIEG

Leonid Rosko-Pouding

nevez. Mar bez broudet unan bennak war-zu al levrioù istor e brezhoneg gant Jakez Karter e tegas d'e soñj ez eus bet embanet, daou pe dri vloaz zo, ur romantig istorel e ti Al Liamm : *Ur Marc'hadour a Vontraouez*, gant Jakez Konan. An hevelep ti a embanno a-benn nebut buhez-skrid Laenneg gant Goulc'han Kervella.

### Paskal ar Marc'hev

Kendalc'h *Ur pezhed marvel eo Kuitaat ar vammvro* a vo kavet war niverenn 32 Al Lanv

### MARSEL KLERG

Deut omp hiziv da lavarout kenavo, evit ar wech diwezhañ, d'hor c'heneil, d'hor breur er stourm, Marsel Klerg. Goude un hir a gleñved ez eo aet d'ar vro nemet ma anavez- er enni ar peoc'h hag an diskiuzh. N'en doa ket bet kalz, er bed-mañ, dreist-holl war fin e vuhez, nag eus an eil, nag eus egile.

E Breizh-Uhel eo a bet ganet an Ao. Klerg, unnek vloaz ha tri-gant a zo. Evel kalz Breizhuhezil e oa un den en ur pezh, en ur bloch, na oa ket tuet d'ar marc'hata. Dibabet en doa ar brezhoneg da yezh, un tammig evel m'en doa dibabet Doue da vestr. Da vat ha da viken. Ne oa ket an Ao. Klerg unan da bouezañ-dibouezañ an diveyhegezh, ne oa ket unan da vuzuliañ, en e vuhez, lodenn an Aotrou. An dibab graet gantañ da vezañ beleg-parrez er vro vrezhoneger a ziskouez fraezh a-walc'h en doa fellet dezhañ bevañ pen- da-benn en e wirionez, diouzh e gredenn ha diouzh e gous- tians. Hag e reas.

Ar seurt tud n'e voe mizez dikrubiñ o buhez. Ha gant ar re a emban ar memes menoioù e c'houzañvont ar muiad. Ne gomzint ket eus e drubiñhoù gant e eskopti. Gwelloc'h e anavezant e drubiñhoù gant ar *Bleun-Brag*. Diwarma avet ez eus bet ganet div oberenn, a chomo e anv stag outo : *Kuzul ar Brezhoneg*, m'eo bet ar rener kentañ anezhañ, hag ar gelaouenn *Barr-Heol*.

Deut e oa Marsel Klerg da vezañ ur mestr war ar yezh : gouzout a ouie gant piv mont da gemer kentele, gant piv oa teñzor ar brezhoneg, hag amañ e fell din kaout ur soñj evit an hini a zo bet e-pad hirvoazhezhioù, o tere'hel ti evitañ e presbital Bulien, hag ivez, ma c'hellan lavarout, o tere'hel brezhoneg evitañ, Anna-Vari, e garabassen. Hi, ha re all evelit, labourerien-douar ha tud ar menajoù, o deus lakaet evitañ ar brezhoneg da vezañ yezh al labour hag ar pemdez.

Un andon all a oa ivez d'e anaoudegezh avat : gouzout a ouie ez eus gant pep yezh evel gant pep den, un istor hag ur famil. Desket en doa kenbraeg, en un doare dispar, ha gant troidigezhioù diwar ar yezh-se : e droidigezh di- wezhañ, *Canu Aneirin*, en deuz bet al blijadur da gout en e zaoarun un nebeut dezioù a-raok e varv. Keuz hon eus

<sup>1</sup> Nemet evit pezh a sell ouzh al lennegezh arnevez. Droc'herezhioù a lavront, mes n'int ket lennegezhourien.

<sup>2</sup> S.o. *La vie politique en France*, René Rémond, e ti Armand Colin.

<sup>3</sup> S.o. da skouer, *Le matricat breton*, gant Agnès Audibert. E dibenn al levr e kaver roll al levrioù o deus tavezet da sevel ar skrid ; er rummad "lennegezh" ez eus war- dro 40 oberenn, 30 a zo bet skrivet en XIXvet kantved, pe a bled gant ar mare-se. Evel ma ne vije ket bet a lennegezh abaoe ! Ne oar ket A. Audibert brezhoneg, hel lavar- ret he deus dim. Hogen gerioù galleg kaer a anavez : "Calcul de degré d'anthroponymie bretonne et de l'endogamie géographique", "ambiguïté", "test de Cormann", "uxori- localité". Gwas'hozh, enta, eget ar c'habiten Haddok ; n'eo ket souezhus e vije bet feket m'erezh zo ?

<sup>4</sup> S.o. *Al Lanv*, niv. 30, p.9, "R.B.O. Radio Dieub ?"

<sup>5</sup> Allez da gredañ ! a lavar Naonediz. Gou- zout a ouzomp n'eus ket ebet e Breizh. Seurt traoù n'int ken brammoù genou Gal- laoued. Buanezioù a zo, evel just, eus ar c'hêrioù, hogen amzer a zo.

<sup>6</sup> "Set on gant an ardivinkoù," a lavar ur rocker yaouank, "abalamour ma z' eus anezho binviñ ouzh va servijañ. En hevelep doare n'o deus graet saveren Menez Mikael ar Mor gant ardivinkoù da sevel an arvez-se eus ar beurbadetezh." Ur mouez hoarzh leñan. "An dra nemetañ on kizidiou outañ, ar garantez eo hag ar from a zeu d'hec'h beal."

<sup>7</sup> Skeudenn Vreizh a zo hini an XIXvet kantved, hogen ar binviñ-studi a zo re ar- nevez. Ne zeufe ket da soñj A. Audibert studiañ an dud gant reolennoù psikologiezh ar c'hantved tremezet ; ne zeu ket d'he soñj kennebeur he dije gallet skeudenn ar vro kemmañ abaoe.



d'ar skrivagner bras hon eus kollet.

Ma ouie skrivañ brav, ne skrives ket an Ao. Klerg evit lavarout netra. En un doare akere en em lakaet avat eus tu ar gwir hag ar wirionez. Ha Breizh ne oa ket evitañ ur yezh hepken : bez' e oa ivez ur vro, gant he gwir d'ar frankiz, bez' e oa ivez ur bobl, gant he gwir da vezañ. Ar re yaouank bet en toull-bac'h evit Breizh, a zalc'h soñj eus e galoñgezh hag eus e vadelezh.


Aotrou Klerg, un tamm ac'hanomp a ya kuit ganeoc'h. Met en hor glac'har e c'hellan lavarout ivez : un tamm ac'hanoc'h a chom bev enomp — ho preudher ha ken- stourmerien. Dalc'het e vo gant an emgann, Ao. Klerg, mignon karek : goude ho puhez a labour hag a emroustet, koussit bremañ e peoc'h.

Kenavo, Klerg.  
Kenavo er bed all.


prezegenn distaget gant Per Denez  
e bered Vullien — 31 VII 84

# Beaj Toñtoñ e kêr Roazon.

Mitterrand, e Roazon, a c'houlenn krouidigezh ur C'h.A.P.E.S. war ar brezhoneg... ha war al lennegezh a-vremañ.




Ha perak pas war pep tra ?



↑  
Kelennner  
ordiner

↑  
Kelennner  
brezhoneg

Mitterrand, e Roazon, a lârn'eus ket bet graet trawalc'h evit ar brezhoneg er radio.



Abjean, war FR3, a gompren ez eus bet graet re !



Mitterrand, e Roazon, a lârn'omp tout ag ar memes bro

Job Ti-Plañch a zo souezhet-bras.

